

ISTORIOÙ

TENNET EUZ AR SKRITUR-SAKR

gat an Tad BERTHE, Redamptorist,

LAKEAT E BREZOUNEK GAT AN A. SANN,
PERSOUN BANNALEC.

TRIVED LEORIK :

JOSEPH



BANNALEC.

23 a viz Here, Gouel hor Redamptor.

ISTORIOU

TENNET EUZ AR SKRITUR - SAKR

gat an Tad BERTHE, Redamptorist,

LAKEAT E BREZOUNEK GAT AN A. SANN,
PERSOUN BANNALEC.

TRIVED LEORIK :

JOSEPH



BANNALEC.

23 a viz Here, Gouel hor Redamptor.

APPROBATION DE MGR LAMARCHE

ÉVÊQUE DE QUIMPER ET DE LÉON.

ÉVÊCHÉ
DE QUIMPER
ET DE LÉON

Quimper, le 25 mars 1892.
En la Fête de l'Annonciation
de la Sainte Vierge.

IMPRIMATUR.

CH. LELEUX, Vic. Cap.

Arras, 23 Avril 1892.

Diocèse de
Quimper & Léon
— Collège de Quimper —

Document numérisé en 2016

Cher Monsieur le Curé,

Les Récits Bibliques du R. P. Berthe, Rédemptoriste, obtiennent un grand et légitime succès. Ce sont des résumés substantiels et admirablement faits de l'Histoire de l'Ancien et du Nouveau Testament.

Vous avez eu la pensée et je vous en félicite, d'en faire bénéficier notre pays Breton qui y trouvera un complément très utile du beau livre *Testament Coz ha Testament Nevez*. Je ne puis donc que vous encourager grandement à poursuivre votre excellent travail de traduction, qui, pour une part très sérieuse, servira les intérêts de la Foi et de la Langue Bretonne dans notre pays.

Croyez, cher Monsieur le Curé, à mes sentiments d'affectueuse estime et d'entier dévouement.

+ THÉODORE, Évêque de Quimper et de Léon.



JOSEPH

I.

ESAÛ HA JACOB.

GOUDE maro Abraham, he dad, Isaac a ieas da jomm da Versabee, e kichen ar puns a ioa bet hanvet gat Agar puns an Hini a vev hag a vel. Jehovah a skuillas he vennoz varnha.

Eun deiz, e lavaras dezha. « Ne vankin biken d'ar ger am euz roet da Abraham. Rei a rin d'ho lignez bro Kanaan; ker stank e vezo an dud euz ho ouenn hag ar stered en oabl, hag an holl broiou euz ar bed a vezo benniget en *Hini* a c'hano euz ho famill. Setu penaoz e fell d'in rekompansi Abraham, va mignoun, abalamour eo bet bepred sentuz ha m'hen deus miret va lezen. »

Daou vap Isaac ha Rebecca a greske assamez e ti ho zud. Mez ar re-ma n'oant ket dineac'h var gount ho daou grouadur. Araok zo-ken m'oant gagnet, ho mam e doa bet kement a boan gatho, ma savas keuz gathi meur a veach da veza goulennet digat Doue beza mam. Goulen a reas kuzul digat

Doue hag e klevas eur vouez e lavaret dezhi : « Euz an daou vap a zougite e savo daou boblad tud ag a en hem ganno etrezo : Ar iouanka a vezo treac'h d'egile hag ar c'hossa a ranko plega d'he vreur. »

Rebecca, a c'hanas dezhi eur c'houblad. Ar c'henta a ioa rouz, blevek evel eul loan gouez hag a oue hanvet Esaü : an eil a ioa krog e seul-troad he vreur evel p'hen dije c'hoant da gemeret he blass hag a oue hanvet Jacob.

Kreski a reont assamez dindan ar memez toen. Hogen, dishenvel int dre ho spered, dre ho doareou, koulz a dre ho bizaj. Esaü ter evel ar flamm, chasseur euz an dibab, en hem blije dre ar c'hoajou hag ar menezioù pe e labourat an douar. Jacob a ioa eur potrik habask : miret a rea al loened avechou ; mez pervaia e veze en ti. Esaü a blije kalz da Isaac abalamour ma zoa eur paotr dihun, dispount ha ma tigas dezha aliez loened gouez lazet gantha er chasse. Mez Jacob oa moumoun Rebecca. — Eun deiz, Jacob en devoa lakeat pizruz da boazat evit he bred. Esaü, pa zistroas euz ar park, a ioa skuiz-maro ha dare gat an naoun. « Roit d'in ar pladad piz-se, a lavar-hen da Jacob. »

« Ia, a lavar hema, a bouez ma rooc'h d'in ho kuir a vap hena. »

« Mad ; ne ran forz, a lavar ar chasseur ; pe-tra' dalvezo d'in-me va guir, pa vezin maro gat an naoun ? »

— « Touit neuze, a lavar Jacob. »

— « Hen toui a ran, a respount Esaü. »

Var gement-se, e kemer he vara hag ar pladad piz. Drebi hag eva a reas eb kaout kalz keuz d'an

taol sot, en devoa great ; rak guerzet en doa marc'had-mad ar privilachou kaer a dlïe dont dezha dre ma zoa ar map hena.

Evit guir, diskuez a reas prest goudeze dre he vuez fall n'oa ket an hini a dlïe reseo grassou kaer an Aotrou Doue.

D'an oad a zaou-ugent vloaz, eb lavaret ger d'he dad ha d'he vam, ha petra bennak m'en doa Abraham, he dad koz, difennet ober nep alians gat merc'hed an Idolatred, Esaü a gemeras an eil var lerc'h eben diou c'hreg Hetheanez : unan anezho oa Judith, merc'h Beer hag eben a ioa he hano Basemath, merc'h da Elon. En hem lakaat a rea evel-se e riskl da goll he feiz. Pa deuas ar c'helou-ze beteg ennhou, Isaac a oue glac'haret braz ha Rebecca a gredas n'oa ket Esaü an hini a ioa galvet gat Doue evit beza heritour ar bromessa. Setu perak ive, marvad, en devoa Doue her lakeat da verza ar guir en doa a vap hena.

Hogen, Isaac a ioa koz. Seitek vloaz ha c'huec'h ugent en doa. Dall oa, hag he nerz a ioa eat digantha. Araok mont da gaout he dud koz e fellas dezha rei d'he vap hena an heritaj hag ar bennoz hen doa bet he unan digat Abraham. Her gervel a reas eta hag e lavaras dezhan : « Esaü, va map, koezet eo varnhon dervezioù ar gozni, ha ne ouzoun ket a n'ema ket tost d'in ar maro. Kemerit eta, va map, goarek ha birou, ha kerzit da laza d'in eul loan gouez bennak. Gat ho chasse, c'hui a fardo d'in ar pred a blij d'am c'haloun. C'hui her servicho d'in ha goudeze me a roio d'eoc'h, araok mervel, va diveza bennoz. »

Esaü a ieas dioc'h-tu var ar meaz da ober ar pezh

a ioa gourc'bemennet dezha gat he dad. Hogen, Rebecca e doa klevet komzou Isaac hag a oue mall gathi kounta da Jacob ar pezh he doa klevet hag a ioa e vont da veza great. Isaac a ioa e vont da rei he vennoz da Esaü goude m'hen doa hema guerzet d'he vreur he vir a vap hena.

« Va map, emezhi, heullit, penn-da-benn, ar c'huzul a ro d'eoc'h ama ho mam. It da glask e touez al loened diou c'havrik iaouank euz ar re vella evit ma poazin anezho er fessoun a blij d'ho tad ar muia. C'hui neuze ho zervicho ho-c'hunan, ha d'eoc'h e roi he vennoz araok mervel. »

An taol finessa-ze ne zisplije ket da Jacob. Mez penaoz en hem gemer ?

« Gouzoud a rit, emezha d'he vam, e zeo Esaü blevek. Ma tioues d'am zad lakaat he zourn varnhon, e sonjo dezha em euz klasket ober goap anezha hag, e leac'h bennoz, eo malloz a dennin varnhon. »

« Ra guezio ar malloz-se varnhon-me, a lavar raktal Rebecca ; hag iit buhan da gerc'het d'in an diou c'havrik. »

Jacob a zentas ha Rebecca ne oue ket pell e fardad he bred da Isaac, er fessoun ma c'houie ervad e plije dezha. — Neuze e viskas d'he map dillad kaerra Esaü. En dro d'he zaouarn ha d'he c'houzouk e lakeas krec'hign fresk ar c'havrik. Jacob neuze a gemeras ar bara poazet dindan al ludu hag ar pred kig a ioa aozet evit he dad.

Pa erruas dirak ar patriarch santel :

« Tad, emezha, »

« Me ho klev. Piou hoc'hui, va map ? »

« Me eo Esaü ho map hena. Great em euz ervez ma ho poa lavaret d'in ha digass a ran d'eoc'h bre-

ma ar pezh am euz paket er chasse. Savit eta ; Drebit, ha goudeze e rooc'h d'in ho pennoz. »

« N'e ket bet hir ho chasse, va map ! »

« Doue hen deus great d'in kaout d'eoc'h-tu ar pezh a glaskan. »

Evel ma chomme gantha eul lastez disfizianz, ar c'heaz dall a lavar dezhan :

« Tostañt ama, va map, ma touchin ouzoc'h ha ma ouezin ervad eo c'hui Esaü. »

Jacob a dosteas ouz Isaac hag an tad a begas en he zaouarn :

« Ar vouez, emezha, eo mouez Jacob ; hogen an daouarn-ma eo daouarn Esaü. »

Kaer hen devoe trei ha distrei an daouarn-ze, blevek evel re Esaü e chomme c'hoaz en aoun na vije ket Esaü eno hag he c'houlennas adarre araok rei he vennoz kenta :

« Ha c'hui eo e guirionez va map Esaü ? »

« A dra-zur, a respountas Jacob. »

Isaac neuze a azezas. Drebi a reas ar pred a ioa digasset dezhan, ha goude beza evet an tassad guin kinniget dezha gat Jacob, e lavaras :

« Deuit ama, va map, ha roit d'in eur pok. »

Jacob a dostaas hag a bokas dezha.

Kerkent a ma klevas ar patriarch santel ar c'huez mad a zave euz a zillad he vap, e za evel er meaz anezha he unan hag e sao he zourn evit rei dezha he vennoz.

« Setu, emezha, ar c'huez a deu euz va map a zo henvel ouz ar c'huez a deu euz eur parkad ed benniget gat Doue. O va map, plijet gat an Aotrou rei d'eoc'h ar gliz euz an Env hag an druzoni euz an douar ! ed leiz ho parkeier ha rezin leiz ho kui-

niennou ! Ra blego ar boblou dindannoc'h ha ra stouo dirazoc'h ho preudeur evel dirak ho mestr ! An nep piou bennak ho mallozo, ra vezo mallozet ! ha bennoz da gement hini ho pennigo ! »

Isaac hen devoa perachuet da gomz ha Jacob a ioa nevez-eat dioutha pa ziouezas Esaü ha gantha etre he zaouarn ar pred-chasse hen devoa aozet evit he dad.

« Savit' ta, va zad, emezha, ha drebit ar pred o poa goulennet diganhen. Drebit evit ma rooc'h d'in goudeze ho pennoz. »

« Piou ho-c'hui, eme ar patriarch, mantret-holl ? »

« Me eo Esaü, ho map hena. »

Ne c'helfet ket lavaret peger sebezet e chommaz Isaac, pa glevas ar gomz-se.

« Ha piou eta, emezha, a zo deuet ama en ho raok da ginnik d'in eur pred-chasse hag hen deuz resevet diganhen eur bennoz a ne c'hellan ket mui distrei varnhi ? Rak her benniget em euz ha benniget e vezo. »

Pa glevas ar c'homzou-ze, Esaü a zivinas petra' ioa bet great. Neuze ne ket krial eo a ra, mez iudal evel eul loan gouez.

« Va zad ! va zad ! emezha en he zizesper, roit d'in-me ive ho pennoz ! »

« Va map, ho preur a zo deuet ama evel eul laer hag hen deuz resevet ar bennoz a ioa dleet d'eoc'h. »

« Va breur, a lavar Esaü e kounnar, hen deuz lakeat, siouaz ! da veza guir an hano a Jacob roet dezha. Setu ama an eil guech evintha d'am laerez. Laeret en devoa va guir evel map hena ha brema e tenn diganhen-ho pennoz. — Va zad, va zad, emezha, en eur ziroll da lenva, a ne jomm ket ganeoc'h

eur bennoz bennak c'hoaz da rei d'in, da rei d'ho map Esaü ?

« Va map, her lakeat am euz da veza ho mestr, ha galloud am euz roet dezha var he holl vreudeur. Roet em euz dezha ar guin euz ar vinien hag an ed euz ar park. Petra' ellan-me da ober brema evi-doc'h. o va map ? »

« N'ho c'heus eta nemed eur bennoz da rei, a lavar d'he dro Esaü, en eur ouela goassoc'h-goaz. Me ho ped, va zad ; va bennigit ! »

Ar patriarch santel en devoue truez ouz he vap reuzeudik. Kenteliet gat Doue, ne dlie ket terri an testament en doa great ; mez lavaret a reas da Esaü : « Ho lod ho pezo e druzoni an douar hag er gliz a guez euz an Env. Beva' reoc'h dre ar c'hleze ha servicha' reoc'h ho preur. Mez dont a rei an amzer ma taoloc'h ar ieo divar ho chouk ha ma savoc'h huel ho penn. »

Neuze e veljot peger guir oa lavar Jehovah divar benn ar c'houblad bugale-ze. « Tad e vezint da zaou bobl hag ar iouanka a vezo treac'h d'ar c'hossa. » Isaac a vele gat estlam holl galloud bolontez Doue. Araok ma zoa ganet an daou grouadur, Doue he unan en devoa merket pehini anezho a vije heritour ar bromessa. Esaü, dre he vuez fall, a ziskuezas n'oa ket faziet an Aotrou ; ha Rebecca gat he spe-red lemm ha dre he zaoliou fin a lakeas an traou da vont ervez bolontez an Aotrou Doue. Ne ouzomp ket ag Isaac, en he galoun, a gavas mad kement a ioa great gat Rebecca evit lakaat Jacob e leac'h Esaü. Mez map santel Abraham a adore providans Jehovah a deu bepred a-benn da ober ar pezh en deuz c'hoant, pe dre an dud vad pe dre an dud fall.



II.

JACOB TEC'HET EUZ AR GEAR.

ESAÛ a zalc'he kassouni oc'h Jacob abalamour m'en doa laeret bennoz he dad divar he goust. Eun dervez zo-ken, oa kement a zrouk ennha ma c'hourdrouzas laza he vreur kerkent a ma vije echu kañn gat ho zad.

Ar gourdrouzou-ze a deuas bete skouarn Rebecca hag houma a gemeras aoun evit he map.

« Jacob, emezhi, ho preur Esaü a c'hourdrous ho lakaat d'ar maro. Savit eta hag asuit affo mont d'ar Mezopotamii. Eno, c'hui a gavo digemer e ti va breur Laban, a zo en Haran. C'hui a jommo eno ken na vezo torret var Esaü. N'ho pezo ket hir amzer da dremen er vro dianveaz-se. Rak a benn-nebeud, ho preur en devezo ankounac'heat ar boan ho-c'heus great dezha ha neuze me a gasso kannad d'eoc'h da zistrei. Kit, va map; rak krena'ran gat an aoun am euz da goll va daou vap en eun taol, en eun dervez, unan dre dorfed hag egile evit beza great an torfed. »

Red oa rei da gredi da Isaac oa mad d'he vap Jacob tec'het, eb rei gouskoude da anaoud dezha perak e zea kuit. Rebecca n'oue ket nec'het.

« Merc'hed Heth, emezhi da Isaac, a ra d'in kaout hir an deiziou diveza euz va buez. Mar tioues da

Jacob kemeret eur vaouez er vro-ze, e varvin gat ar c'hlac'har. »

Neuze e teuas da zonj d'ar patriarch koz euz ar pezh en devoa great Abraham evintha. Kemen a reas da Jacob dont d'he gaoud. Rei a ra dezha he vennoz hag e ro dezha ar gourc'hemen-ma : « Va map, gat a reoc'h, ne gemerit ket evit pried eur vaouez euz a vro Kanaan; mez it d'ar Mezopotamii; it da di Vathuel, tad ho mam, hag eno c'hui a zemezo da unan bennak euz a vugale Laban hoc'h eontr. »

Jacob a zaoulinas dirak an den koz santel-ze hag hema, an daelou en he zaoulagad, a roas he vennoz d'ar beajour iaouank.

« Ra blijo gat an Aotrou holl-galloudek, emezha, rei d'eoc'h he vennoz, rei d'eoc'h ha d'ho pugale ar c'hrass da greski evit ma vezoc'h ar penn euz a eur bobl niveruz. Plijet gat Doue skuill varnoc'h ha var ho pugale ar bennoz hen devoa promettet da Abraham ha ra deui da veza tra Jacob an douar-ma ne m'oump ennhi brema nemed tremenidi ! »

Ar c'heaz Jacob a gemeras he vaz hag a gerzas varzu broiou ar Sao-Heol. Eat oa en tu-all da Vambre, el leac'h m'oa bet beziet Abraham; eat c'hoaz en tu-all da venez Moriah, el leac'h m'oa bet Isaac, he dad, a-c'hourvez var an aoter evit beza lazec'h. Eun abardaez, p'edo an heol e kuzet a-drèn ar menezioù, e chommas a-za evit ober eun tam ehan. Kemeret a ra eur mean divar an douar, her lakaat a ra dindan he benn hag, er stuz-se, en hem ro da gousket. Neuze e vel, dre he gousk, eur skeul burzuduz a zo eur penn anezhi harp ouz an douar hag ar penn-all a zo en Env. Elez a bigne hag a

ziskenne dreizhi. Jehovah, harpet ive oc'h ar beg huela, a lavaras dezha evelhen.

« Me eo ar mestr ; me eo Doue Abraham ha Doue ho tad Isaac. D'eoc'h ha d'ho pugale var ho lerc'h e roin an douar oc'h gourvezet brema var-nhi. Ho lignez, stank evel an treaz-nij euz ar gouelec'h, en hem skigno euz ar sao-heol d'ar c'huz-heol, euz an anter-noz d'ar c'hresteiz hag an holl boblou a vezo benniget ennoc'h hag en *Hini a c'hano ac'hanoc'h*. Me ho tiouallo e kement leac'h ma zeoc'h hag ho tigass a rin en-dro, da vro ho tud koz, d'ar vro-ze am euz promettet rei dezho. »

Jacob pa zihunas a ioa beuzet he galoun er joa. Doue Abraham hag Isaac a roe dezha da anaout ar peza a dlïe da ober evitha, her lakea da veza penn eur bobl vraz ha tad d'an Hini a dlïe savetei an holl boblou euz an douar.

« Oh ! ia ! emezha, al leac'h-ma a zo santel ha me n'her gouien ket ! »

Pa zonzj er skeul hen deus gulet, en Elez a bigne hag a ziskenne dreizhi evit digass d'an dud gourc'hemennou Jehovah, ha kass varzu Doue reked an dud, e lavar spountet holl : « Pegen terrupl eo al leac'h-ma ! Ama ema ti Doue ha porz an Envou. »

Pa darzas an deiz, Jacob a zavas en he za, a skuillas eun nebeud oleo var ar mean a ioa bet din-dan he benn hag her savas evel eun aoter evit dis-kuez he anaoudegez-vad da Zoue. Ar gear vihan a ioa e kichen hag a ioa he hano Luza oue leshan-vet gantha Bethel, da lavaret eo, ti an Aotrou Doue. Neuze araok kenderc'hel gat he hent e reas ar ouestl-ma : « Ma vez Doue a-unan ganhen, mar kendalc'h d'am dioual evel m'Hen deuz promettet

d'in, ma ro d'in bara da zrebi ha dillad da viska, mar gellan distrei eb drouk da di va zad, evit dis-kuez va anaoudegez vad da Jehovah, va Doue, me a reio euz ar mean-ma eun aoter hag a vezo han-vet ti Doue hag eno me a ginnigo dezha an deok euz va holl vadou. »

Komzou Doue a roas nerz kaloun da Jacob ha kerzet a reas adarre varzu bro ar Sao-heol. N'oa ket goal-bell dioc'h bro Nakor pa velas e kreiz ar meziou eur puns braz, en dro dezha teir vandennad denved, e c'hortoz ma vije deuet ar bandennou all, evit ma vije digoret ar puns ha taolet an dour er c'hanïou.

« Breudeur, a lavar Jacob d'ar bastored, euz a be-leac'h ho-c'hui, m'ar plij ? »

« Euz a Haran, emint-hi. »

« Ak anaout a rit Laban, map da Nakor ? »

« Ia, da. »

« A iac'h mad eo ? »

« Iac'h-pesk. Oc'h-penn-zo, seit ; setu a-ze he verc'h Rachel e tont gat he denved. » — « Goal huel eo c'hoaz an heol evit kass al loened d'ho c'hraou. Perak ne roit-hu ket a zour dezho ha n'ho c'hassit-hu ket goudeze eun nebeud c'hoaz da beuri ? »

« Ne c'hellomp ket ober kement-se, emezho. N'euz ket konje da zével ar mean divar ar puns ken na vezo dastumet ama, en-dro, an holl loened. »

A veac'h oa echu ho c'haoz ma tiouezas Rachel gat denved he zad. Rak hi he unan a vije ouz ho diouall. Raktal ma velas Jacob he giniterv iaouank e lammas da boket dezhi ervez giz ar vro-ze. Ten-na reas dour euz ar puns evit rei da eva da loened he contr. « Rachel, emezha en eur boket dezhi, me eo niz ho tad ; me eo map Rebecca. »

Ar verc'h, laouen-braz, a ia diere da gass ar c'helou d'he zad. Lavaret a ra dezha, ema e paouez dont eno Jacob, mab he, c'hoar Rebecca. Prestik goudeze, Laban a ioa e kichen he niz ha goude beza he vrietead e kass anezha gantha d'he di.

Neuze Jacob a lavaras dezha perak oa deuet er vro-ze. N'oa ket deuet da Haran evel Eliezer guechall da glask eur pried ha distrei kerkent gathi d'he vro. Hen a zo kasset kuit euz ar gear hag a zo deuet da c'houlén beza repuét e ti Laban, ken na c'houlaoú an deiz ma c'hell distrei dindan toen Isaac ha Rebecca. C'hoant en doa ive, emezha, hag esper en doazo-ken da zistrei d'he vro gat eur pried choazet e touez he gerent. Rak he dad en doa difennet outha ober anaoudegez gat merc'hed Kanaan.

« C'hui a zo va c'hik ha va goad, a-lavar Laban goude beza klevet komzou he niz. Adalek brema e vezoc'h ama evel unan euz va mipien. »

Jacob a deuas eta da veza evel unan euz a dud an ti. Mont a rea gat Rachel, gat he breudeur hag he c'hoarezed, da ziouall al loened. Epad pevarzek vloaz e chommas e servich Laban. Hema a roas dezha da genta evit pried Lia, he verc'h hena ha goudeze Rachel a blije dezha kalz muoc'h eget he c'hoar. Doue a roas dezha da genta dek map : Ruben, Simeon, Levi, Juda, Issakar, Zabulon, Dan, Nephtali, Gad hag Azer. — Hogen, Rachel a jommas pell ep beza benniget gat Doue. Ar c'heaz greg glac'haret a bede hag a aspede an Aotrou Doue da denna divarnhi eur seurt dishenor. An Aotrou a zelaouas he feden hag a roas dezhi eur map. Hanvet oue Joseph. Jacob a lavaras neuze da Laban :

« Va lezit brema da zistrei d'am bro ha da gass ganhen va holl famill evit al labour am euz great evidoc'h betek-henn. »

« Bennoz an Aotrou Doue a zo diskennet ganeoc'h var va ziegez, a respout Laban : chommit c'hoaz gan'eomp ha me a roio d'eoc'h ar goumanant a c'houlennoc'h diganhen. » Evit plijoud d'he eontr e chommas c'hoaz gantha epad dek vloaz. E-doug an amzer-ze Doue a vernias pinvidigez en he di. E ber amzer, Jacob a deuas da gaout evintha he unan torrajou geor ha denved, ezen ha kanvaled, hag eun niver braz a vevelien hag a vitizien, ken na oa deuet Laban da gaout goarizi (jalouzi) outha. — Neuze e savas adarre he zaoulagad etrezek he vro goz, varzu he dad hag he vam muia karet. A-berz Jehovah, e kemer he dud, he loened, he holl vadou hag e kerz varzu bro Kanaan.

Gouskoude ar paour-kez Jacob n'oa ket dinec'h aoualac'h abalamour d'he vreur Esaü. Rak hema a ioa deuet da veza roue ar gouelec'h, e bro Edom. Abaoue ugent vloaz m'edo e ti Laban, Jacob hen doa gedet meur a veach ar c'hannad a beoc'h prometted dezha gat he vam ha n'oa deuet nep kannad dezha. Kement-se a ioa sin fall. Setu perak, araok treuzi ster ar Jourden e kassas lod euz he zervicherien da rei ar c'helou-ma d'he vreur :

« Jacob d'he vreur Esaü. — Bevet em euz evel eun den estren, e ti Laban, betek-henn. Distrei a ran d'ar gear gat kalz torrajou ejenned, ezen ha denved; gat kalz ive a vevelien hag a vitizien, hag e kassan ar gannaded-ma d'am Aotrou evit ma ma kavin trugarez dirazhan. »

Ar gannaded a zistroas buhan da gaout Jacob

hag a lavaras dezha edo erru Esaü d'he ziambrouk gat pevar-c'hant den. Jacob, strafillet-holl, a ra diou loden euz he dud, evit ma c'hello unan, da vihana, tec'het epad ma vezo eben kannet gat he vreur. Neuze e za d'an douar hag e c'houlén sikour digat Doue.

« Doue Abraham hag Isaac, emezha, c'hui eo-c'heus roet urz d'in da zistrei d'am bro ha lavaret ho-c'heus d'in o pijs va diouallet. Ne ellan ket ho tamall : rak trugarezuz oc'h bet em andret, pegen dister bennak ounn ha great ho-c'heus evidon kement ho poa promettét d'ho servicher. Pa dreuzis ar Jourden, brema' zo ugent vloaz, n'hem boa evit holl danvez nemed ar vaz-ma ; ha setu brema e m'oun e vont da dreuzi adarre ar ster-ma hag e zeus d'am heul diou vanden dud ha kalz pinvidigez. Tennit ac'hanon, o va Doue, euz a dre daouarn Esaü. Rak aoun am euz na dreuzfe dre ar c'hleze ar c'hreg hag he bugale. O pezet sonj, Aotrou, ho c'heuz promettét d'in va benniga ha lakaat va ouenn da zével ker stank hag an treaz var ribl ar mor. »

Antronoz, pa zavas, Jacob a zispartias e-touez he loened ar re a felle dezha kinnig e prezant d'he vreur Esaü : Daou-c'hant gaor hag ugent bouc'h ; daou-c'hant danvadez hag ugent maout ; tregont kanvalez gat ho re vihan ; daou-ugent bioc'h hag ugent taro ; ugent azennez ha dek azennik. Lakaat a reas neuze he zervicherien d'ho c'hass d'he vreur an eil rummad var-lerc'h egile.

« Kit araok, emezha, ha list eun nebeud hent euz an eil banden d'eben. Pa velo ar vanden genta, va breur ne ello ket miret da c'houlén diganeoc'h piou

eo ho mestr, da be leac'h ez it da biou eo al loened-ma. — C'hui, neuze, a respounto : An traou-ma holl a zo d'ho servicher Jacob. Eur prezant eo ag a fell dezha da ginnik d'hon Aotrou Esaü. Oc'h-pennzo, ema erru var hol lerc'h hag a benn nebeud her guelfot. — An holl bastored an eil varlerc'h egile a reio ar memez respount. »

Jacob a zonje o devije ar prezantchou pinvidik-se tenereat kaloun he vreur hag hen troet da ober dezha eun digemer mad.

Araok e zeas eta ar zervicherien ; mez Jacob a jommas eun nozvez c'hoaz er c'hamp.

Antronoz, mintin-mad, e kemeras heziou c'hreg, ho mitizien, he unnek krouadur hag ho c'hassas en tu-all da ster Jaboc, dre eun treiz a ioa izhel an dour ennha, evit ho diouall rak Esaü. Hen a jommas he unan var ribl ar ster.

Setu eur goaz e tont da c'hourin outha bete goulou deiz ha ne c'helle ket rei lam dezha. Ebken, evit diskues da Jacob peger gallouduz oa e touchas ouz unan euz nervennou he vorzed hag an nervenze a zec'has kerkent.

« List ac'hanon da vont kuit, a lavar neuze ar gouriner. Rak ema goulou-deiz. »

« Biken n'ho lezin ken n'ho pezo va benniget. »

« Pe hano ho c'heuz c'hui ? »

« Jacob. »

« Mad ; iviziken e vezoc'h leshanvet Israel da lavaret eo Kren eneb Doue, Hogen, mar gellit gourin oc'h Doue, piou var an douar a vezo treac'h d'eoc'h ? »

« A c'hui, a lavar Jacob d'he dro, ho-c'heuz gourinet ouzin, piou ho-c'hui ? »

« Perak eun henvelep goulenn, a lavar-Hen ? »
hag en eur dec'het kuit e ro dezha he vennoz.

« Doue am euz gullet dirazhon, a lavar Jacob,
souezet-braz ha n'oun ket marvet. »

Al leac'h-se a hanvas *Phanuel*, da lavaret eo
dremm Doue.

D'ar mare-ze, an deiz a c'houlaoue. Jacob a guiteas *Phanuel*. Mez kamma a ranke dre ma zea, abalamour oa bet sec'het eun nerven dezha gat Doue epad he frappad gourin. Ne zaleas ket da velet he vreur *Esaü* a deue d'he ziambrouk gat pevar c'hant den. Neuze e rannas he famill e teir loden. Er penn araok, e lakeas he vitizien gat ho bugale ; goudeze Lia gat he bugale ha, da ziveza, Rachel ha Joseph.

Hen a ieas neuze er penn araok ha pa oa dija tost da *Esaü* e stouas bete seiz guez dirazhan. — Pa velas he vreur o renta dezha kement a enor, *Esaü* a lammas gantha d'he vriata. Her starda'ra var he galoun en eur skuill kalz dañlou. Sevel a ra neuze he zaoulagad hag e vel dirazhan gragez ha bugale.

« Hag ho famill int-hi, emezha ? »

« Ia, a lavar Jacob, ar yugale int roet d'in gat Doue. » — Kerkent, ar mitizien gat ho bugale, Lia gat he re ha Rebecca gat he Joseph a dosta beteg *Esaü* hag a zaoulin dirazha.

« Hag al loened am euz gullet, petra int-hi, a c'houlenn *Esaü* ? »

« Eur prezant eo am euz c'hoant da ober d'am breur, evit kaout he c'hrassou mad. »

« Me' meuz danvez aoualac'h. Dalc'hit ganeoc'h ar pezh a zo d'eoc'h. »

« Salokraz ! o va breur. Mez m'am beus ka-

vet trugarez dirak ho taoulagad, c'hui a gemero diganhen ar prezant dister-ze. Rak ar gullet ac'hanoc'h a zo evidon evel pa me fe gullet Doue he unan. Bezit mad evidhon ha rannit ganhen ar pinvidigez roet d'in gat an Hini a zo mestr var bep tra. »

Esaü a rankas senti ouz he vreur, ha dispartia a rejont an eil diouz egile, mignouned-vraz.

Goude beza diskuizet eur pennadik e *Socoth* ha goudeze e *Sichem*, Jacob a gerzas varzu traonien *Mambre*, el leac'h m'edo ar patriarch *Isaac* var c'hortoz dezha. Edo e tremen dre hent *Ephrata*, leshanvet *Bethléem* divezatoc'h, pa reas eur c'holl braz. Rachel, he bried muia karet, a guezas goll-glan. Edo e vont da lakaat er bed he eil krouadur ; ha kement a boan e doa ma seblante dezhi edo e vont da vervel.

An amiegez a lavaras dezhi : « N'ho pezet ket aoun. Eur map o pezo c'hoaz. »

Mez ar vuez a dec'he diouthi ha dare oa da vervel pa c'hanas he map. Aoualac'h a nerz e devoue evelato evit rei dezha evit hano ; *Benoni*, da lavaret eo : map va anken. Jacob, goudeze, her leshanvas *Benjamin*, da lavaret eo *Baz* he gozni.

Goude beza great kaon d'ar pried-se a garie kement, d'ar c'hreg-se oa bet pevarzek vloaz e servich *Laban* evithi, e tiskennas he c'hory en douar, el leac'h m'oa bet plijet gat Doue kerc'het he Ene. Sevel a reas varnhi eur bez kaer evit digass sonj d'an holl euz a varo Rachel hag euz a gaon Jacob.

Nebeud derveziou goudeze, erruet e penn diveza he belerinaj hir, edo e tiskuiza e kichen *Isaac*, he dad, dindan derven *Mambre*. Ar c'heaz-koz ne ellas

ket guelet he vap, pa ze guir oa dall. Mez evel en deiz m'hen devoa her benniget, he galoun a dride gat ar joa oc'h he vriata. Ne c'hortoze nemed distro he vap evit kimiada diouz ar bed-ma ha mont da gaout he dud koz. Prestik goudeze e varvas, leun a joa hag a zantelez, en eur veuli an Aotrou Doue. He zaou vap, Esaü ha Jacob, hen diskennas er bez, e kichen Abraham, he dad, ha Rebecca he bried, e kavarn Macpelah.



III.

JOSEPH GUERZET GAT HE VREUDEUR.

 R patriarch Jacob a gare he holl vugale. Gouskoude oa muioc'h douget evit Joseph hen devoa neuze c'huezek vloaz : Rak map Rachel oa, he bried muia karet. Ouspen-ze Joseph a ioa eur bugel fur, sentuz ha koant. Doue a zeblante beza roet anezha da Jacob evit he gonforti en he gozni. Evel merk a garantez, he dad a roas dezha eur viskamant marellet, dishenvel diouz re he vreudeur ; ar pezh a lakeas kalounou ar re-ma da drenka gat ar goarizi hag ar gassouni.

Ar santimantchou fall-ze a ieas c'hoaz var ouasaat ha setu ama perak.

Eur vech, epad m'edo e tioual he loened assamez gat pevar euz he vreudeur, Gad, Aser, Zabulon ha Nephtali, e velas anezho ec'h ober traou dizonest. Kement a zrouk a ieas ennha ma flatras anezho d'he dad. Eun droiad-all c'hoaz, e reas kalz displijadur d'he vreudeur o kounta dezho an ure hen devoa bet. « Sonjal a rea d'in, emezha, edon assamez ganeoc'h er park oc'h endram, ha va mandossen-me a zave a zioc'h ho re-c'hui, hag ho re-c'hui, bodet en dro d'am hini-me, a stoue d'an douar evit he adori. »

« Setu a-ze, marvad, ar pezh a ziskues e vezi Roue varnomp, a lavar he vreudeur en eur c'hoarzin

goap dezha ; ha ni, ar re gossa, a ranko plega dindand-houd ! »

Joseph a ioa ken eeun ha ken divaliss ma ne zanje ket zo-ken e c'helle he gomzou hag he ureou kreski ar gassouni a ioa outha e kaloun he vreudeur. E leac'h mouga an tan, eo teuler koat enna eo a reas.

« Guelet em euz, a lavar dezho ; (d'he dad ha d'he vreudeur) ; Guelet em euz, epad va c'houk, an heol, al loar hag unnek stereden e stoui dirazhon. »

Jacob ne c'hellas miret d'he skandalat. « Daoust, emezha, hag ho tad, ho mam hag oc'h unnek breur a ranko daoulina dirazoc'h hag ho-c'hadori. Petra zifini an ureou-ze ? »

Evelato, e leac'h kemeret drouk ouz he vap evel ma rea he vreudeur, e teuas da zonzal en he spered e teue marteze an ureou-ze a-berz Doue hag e verkent traou da erruout divezatoc'h.

Da benn eun nebeud amzer goudeze, Jacob a gassas he botred da ziousal al loened vandro Sicheim. Eno, guechall, oa bet savet eun tam trouz etrezho ha tud ar vro. Gant aoun na vije bet adarre eur c'hrogad bennak, Jacob a gassas Joseph, chomet he-unan er gear, da velet penaoz edo ar bed gatho.

« Guelit, emezha, a iac'h eo ho preudeur, ag e stad vad ema ho loened, a sioul oar e bro Sicheim. »

Joseph a zentas ouz he dad hag a ieas euz a Hebron bete fouenneier Sicheim. Mez ne gavas den eno. Edo e vont a dreuz ar meziou, ne c'houie ket mad varzu pe-leac'h, pa gavas eun den euz ar vro ag a c'houlennas digantha petra' glasse.

« Me'zo deuet da glask va breudeur, a respountas-hen. Ha kemeret a raffec'h ar boan da lavaret

d'in e pe du int eat da gass ho loened da beuri ? »

« N'eus ket pell, eme an den mad-ze, int eat kuit a c'hann ha me' gred beza ho c'hlevet e lavaret e zeant etrezek Dothaïm. »

Ar bourg-se, prajeier glaz tro-var-dro dezha, a ioa eun nebeud leoiou ac'hano, e tu an Anter-noz. Joseph a denn varzu eno hag eb-dale e velas he vreudeur e-touez an ejenned hag an denved. Arrema, kerkent a m'her gueljont, hen anavezaz ive, hag ar guel anezha a lakeas da greski ar gassouni en ho c'haloun, kement ha kement ma lavarjont etrezho o devije her lakeat d'ar maro.

« Setu, emezho, paotr an ureou tost d'eomp, lazomp anezha ha goudeze ni hen taolo er puns koz hag a lavaro eo bet lounket gat eul loan gouez. Neuze e vezo guelet da betra e vezo bet talvezet dezha he ureou. »

Nan, nan ; a lavar Ruben, kement-se ne vezo ket great. (C'hoant en doa da zavetei he vreur ha d'he gass d'he dad). Ne vezo ket laz, ne vezo ket skuillet he c'hoad : aoualac'h eo deoc'h teuler anezha er puns seac'h a zo a-ze. Evelse ho taouarn ne vezint ket sotret. »

Goude beza roet ar c'huzul-ze d'he vreudeur, e pelleas dioutho var eun digarez bennak. Hogen he jonj oa distrei d'ar puns evit tenna he vreur er meaz hag her c'hass en-dro d'he dad.

Kerkent a ma tionez Joseph gatho, he vreudeur a zailh varna evel tud gouez ; diframma' reont digantha he zae marellet, o devoa bet kement avi outhi hag hen diskenjont er puns. Kaer hen devoa krial ha pedi ; n'he zelaouent ket hag eno e felle dezho e vije maro gat an naoun.

Goude m'o devoa great an taol kaer-ze, edont azezet e bord an hent e tribi ho fred pa veljont e tont varzu enno marc'hadourien Ismaelited hag a deue euz bro Galaad. Euz Madian oant, hag eur renkad kanvaled a ioa gatho, sammet a louzeier a c'huez-mad, roussin ha myrrh. Pa gavent an dro, e reant ive trafik ar sklaved. Juda a, gave kriz lakaat Joseph d'ar maro ha pa velas ar varc'hadourien e lavaras d'he vreudeur : « Petra' dalvezo d'eomp-ni beza lazet hor breur ha beza goudeze kuzet he varo ? Oc'h-penn-ze, hor c'hik eo hag hor goad. Kentoc'h eget sotri hon daouarn, guerzomp anezha d'an Ismaelited-ma. »

Komzou Juda a oue kavet mad gat ar vuntreien iaouank-se a gave euzuz ho unan ar pezh o devoa great. Tenna'rejont eta Joseph euz ar puns seac'h hag e rojont anezha evit ugent pezh arc'hant (e Frans, taloudegez daouzek skoed). Ar varc'hadourien her c'hassas gatho d'an Ejipt. Prest goude, e tistroas Ruben d'ar puns evit tenna he brizounier er meaz ; mez n'her c'havas ket eno ha setu hen, divar err, da gaout he vreudeur, en eur regi he zillad :

« Eat eo kuit ar c'hrouadur, a lavar-hen gat dizesper. Reuzeudik ma z'oun ! penaoz e c'hellin-me biken mui mont dirak daoulagad va zad ? »

Hogen ar botred all, eb ober van euz huanadou ha klemmou Ruben, a laz eur c'havrik, a zoub sae Joseph en he goad hag a gass anezhi d'ho zad, gat ar c'helou-ma : « Kavet or beus ar zae-ma er gouelec'h : Evessaït a ne ve ket sae ho map. »

Kerkent a ma sellas ouz ar zae leun-c'hoad, Jacob a anavezaz sae he vap Joseph.

« Ia. Sae va map eo, emezha, en eur ziroll da ouela ; eul loan gouez bennak en deus drebet Joseph ! »

Regi a reas neuze he zillad, guiska'reas eur c'houriz reun hag epad kalz amzer e ouelas d'he vap. Ar vugale digaloun o doa chenchet he zaoulagad e diou feunteun a zaelou a vodas en dro dezha evit klask terri he c'hlac'har. Mez ne felle ket dezha ober laouenidigez gat den.

« Lezit ac'hanon, emezha : An daelou a ruillo c'hoaz euz va daoulagad en deiz ma tiskennin er bez evit mont da gaout va map Joseph. »

Etretant, ar varc'hadourien Ismaelit a errue en Ejipt gat ho sklav iaouank.

Var an douar-ze a ioa douar Misraïm, oa bet kalz boulderz. Abraham, tad-koz Joseph, a ioa deuet di daouc'hant vloaz araok da glask rekour a eneb ar gernez. Hogen, nak a freuz a ioa bet er vro-ze abaoe ! Ar rouanez ginidik ac'hano a ioa bet diskaret gat ar rouanez savet er gouelec'h, gat rouanez ar bastored. Rak, eun deiz, e troas e penn ar re-ma treuzi ster an Nil. Sailla' rejont var tiez an doueou ha tiez an dud pinvidik, ha dre gement leac'h ma tremenent, ne reant nemed distruj. Deuet da veza mistri er vro, ar bastored, goude m'ho doa bet ar gounid ha beza bet treac'h d'ar re all a zilezas ho c'hustumou koz. Kemeret a rejont gizioù an Ejipsianed, hag a benn-nebeud amzer, ne veljot ket an disterra kem etre ar re o doa gounezet ar viktor hag ar re a ioa bet kannet. Gouskoude ar re-ma a zalc'he kalz kassouni en ho c'haloun ha ne glaskent nemed an dro d'en hem zavel a eneb ho mistri nevez.

Doze ne zilezas ket an Israelit iaouank er broiou

estrén. Pa oue lakeat e guerz, e foar ar sklaved, oue guerzet gat an Ismaelited da Butiphar a ioa neuze mestr braz var di Pharaon ha kabiten he zoudarded. Daoust ma zoa ginidik euz an Ejipt, Putiphar, evit tostennat ouz he vestr, a gemere perliessa he zervicherien e touez ar Semited. Evit en taol-ma, n'hen doue ket a leac'h da gaout keuz. Rak an den iaouank hen devoa prenet a ioa euz ar re furra. Mad e tioneze kement a rea ha Putiphar, den a skiant, a velas ervad edo Doue a-du gat Joseph hag e c'henteche Doue anezha evel dre an dourn. Adalek neuze, ne oa nemed evit Joseph, ha Putiphar her lakeas e penn he diegez, gat peb seurt galloud var an holl zervicherien euz an ti.

Abalamour da Joseph, Doue a skuillas he vennoz var an Ejipsian hag hema a vele bemdez he zanvez e kreski, ken e kear, ken var ar meaz, eb m'hen dije netra da ober he unan nemed korvata, drebi hag eva. Joseph a ioa eno hag a zioualle mad tiegez he vestr.

Joseph a ioa deuet mad gat an holl. Plijout a rea dreist-holl d'a c'hreg Putiphar kement ma c'hoanteas gat houma ober ar pec'het vil gantha. Mez Joseph he c'hassas divar he dro en eur lavaret dezhi :

« Va mestr, emezha, en deus fiziet ennhon he holl vadou ; ha me ho c'hundu guella ma c'hellan, eb ma lavar d'in eur ger. Kement a zo dezha hen deus lakeat etre va daouarn nemed *ho-c'hui, he c'hreg*. Penaoz e c'helfen-me senti ouzoc'h eb beza traïtour d'am mestr ha pec'heur braz dirak Doue? »

Ar c'homzou-ze ker fur ha ker sklear ne rejont ket d'ar c'hreg ludik-se chench buez. Bemdez e

klaske an tu d'her lakaat da bec'hi. Eun deiz, edo Joseph he unan en ti gathi, e c'hober he labour, pa deuas adarre dezha. Kregi a rea en he vantel hag e lavare dezha : « Deus da gousket gan-hen. » Hogen Joseph a lezas he vantel gathi hag a dec'has euz an ti. Ar c'hreg fall-ze pa velas an dismegans hen doa great Joseph anezhi hag ar vantel chommet var he lerc'h a douas raktal her c'holl da-viken. Ar vantel var he divrec'h, en hem lakeas da grial a bouez-penn ha da c'hervel holl dud an ti, offiserien ha mevelien. « Ha petra eo d'am goaz, emezhi gat kounnar, beza digasset ama an Hebreadd-se evit va dizenori ? »

Pa zistroas he goaz d'ar gear, ar pezh divez-se a gountas dezha ar memez geier, en eur ziskuez evel test, mantel Joseph.

Putiphar a ieas drouk ennhag eb ober enklask, eb digass dirazha an hini a ioa tamallet e gaou, e lakeas teuler Joseph er prizoun, el leac'h ma veze dastumet an torfetourien barnet gat ar Roue.

Epad an amzer-ze, an den koz Jacob a zouge kaôn da Joseph a grede maro. Joseph ive a skuille daelou c'huerdo e goled he brizoun, a ioa evintha evel eur bez. Mez an Doue, ha bede kement, n'hen d'oa ket ankounac'heat he zervicher mad ha santel.

Ar furnez a ziskennas gantha en toull-ze leiz ha tenval, evit hen diouall a eneb an dud fallagr, tre-c'hi ar geier, e plass ereou rei dezha goalen ar Roue ha var an tal-ze a ioa bet c'hoant da skla-beza lakaat eur gurunen a c'hloar evit biken.





IV.

AR GALEOUNER EAT DA VINISTR.

JOSEPH, hen doa plijet dioc'h-tu d'ar roue Putiphar. Evel-se ive e plijas goude nebeud derveziou da c'houarnour ar prizoun. Hema n'hen devoa morse anavezet eun den iaouank ker mad, ker fur, ken douss. Setu perak e lakeas ennha he holl fizians hag e roas dezha, ouspen ar garg da ziuall an holl brizounerien, an emell euz kement a zelle outha. Eb douetans ebed, Doue a ioa a du gat Joseph hag he zikour a rea en he holl obériou.

Hogen, diuezeout a reas da zaou offiser euz ar Roue koll grassou-mad ho mestr ha beza stlapet er prizoun. Unan anezho oa mestr ar guin, ar boutailler-braz : Egile oa mestr ar bara e palez ar Roue. Mestr ar prizoun ho lakeas etre daouarn Joseph. Bloaz a ioa edont eno pa ziouezas dezho ho daou kaout bep a ure, er memez nosvez. An ureouze a verke dezho ar pez a dlie c'hoarvezout gatho ; hogen ne ellent ket dont a-benn da zivinout petra verkent. Setu perak pa deuas Joseph, mintin-mad, d'ho guele, oant trist-maro ho daou.

« Goal denval e kavan ho penn, a lavar dezho Joseph gat dousder : Hag eun drouk bennak a ve erruet ganeoc'h ? »

« Bep a ure, emint-hi, or beus bet hag a ra d'eomp kalz nec'hamant, ha ne gavomp den da lavaret d'eomp petra' verkont evit an amzer da-zont. »

Joseph a ouie pegement a fizians o doa an Ejiptianed er sorserien, en divinourien hag e kement den diskramailh a gounte kement a c'heier d'an dud.

Joseph a gavas eno an dro da zével ho spered etrezek an Aotrou Doue.

« Jehovah, emezha, ha Jehovah ebken a ell lavaret d'eoc'h ar pez a verk hoc'h ureou ! Gouskoude lavarit d'in petra ho c'heus guele, »

Ar boutailler-braz a gomzas evel-hen : « Me am eus guele dirazhon eur vinien ag e doa tri brank. Ar brankou-ze a roas prest goudeze brons ha bleün ha blokajou rezin euz ar re gaerra. Tass Pharaon a ioa etre va daouarn. Distaga'ris blokajou rezin ha goude beza ho goasket ha lakeat ar guin tennet anezho e tass va mestr, e kinnigchon anezhi dezha. »

Pa en devoue ar boutailler kountet he ure, Joseph a lavaras dezha d'he dro : « Setu ama ar pez a verk hoc'h ure : An tri brank a verk ho c'heus c'hoaz tri dervez da dremen er prizoun hag e teui da zonj ac'hanoc'h d'ar Roue Pharaon goude an tri dervez-se. Neuze e vezoc'h lakeat adarre en ho karg hag ho pezo da rei da eva adarre d'ar Roue evel diagent. Oh ! neuze, me ho ped, pa vezoc'h deuet da veza mignoun d'ar Roue, ne ankounac'hait ket ar paour-keaz Israelit pelleat euz he vro dre c'hoarizi, ha taolet er prizoun du-ma, pegen divlam benak oa. Ho pezet truez ouzin ha pedit ar Roue Pharaon d'am zenna ac'hann. »

Pa glevas ar zetans-ze ker fur ha ken douss da

glevet, oue mall gat offiser ar bara lavaret ive he ure.

« Kaout a rea d'in, emezha, e tougen var va fenn teir gestad vleud. Unan anezho a ioa huelloc'h eget an diou all hag a ioa ennhî a' bep seurt bara hag euz an holl goastellou eo ar fournier boazet da ober. Neuze e velis laboussed e tisken euz an Env hag e roi taoliou beg d'ar pezh a ioa ennhî. »

« Anteur gester, a lavar Joseph eb troidellerez, a verk e tle Pharaon lakaat trouc'ha ho kouzoug d'eoc'h a-benn tri dervez ; e vezoc'h staget ouz ar grouk hag e tiskenno laboussed an Env da zispenn ho korv. »

D'an trede deiz goudeze, oa fest braz en Ejipt abalamour ma z'oa gouel ar Roue. Pharaon ne vankas ket da rei eul lein vraz en he balez d'he holl offiserien. Eped ar pred, e teuas da zouj dezha euz he voutailler-braz hag euz an offiser all hen d'oa karg euz ar bara, hag hen devoa kasset d'ar prizoun. Urz a roas da lakaat ar c'henta adarre en he garg : Evit egile, e roas urz d'he grouga.

Evelse e teuas da veza guir ar pezh en devoa lavaret Joseph.

Ar boutailler, laouen-braz, pa zea er meaz euz ar prizoun a lavare da Joseph n'hen dije morse ankounac'heat komz evintha d'ar Roue. Mez kement a joa hen devoa da veza tennet a boan ma tizounjas euz he vignoun. Tremene a reas daou vloaz arak ma sonjas ennhî ha setu ama dre he abek.

D'ar mare-ze, ar Roue Pharaon en devoue ive eun ure hag a lakeas anezha nec'het-maro. Evit hen tenna a neac'h, hen d'oa kemennet da zont d'he balez kement diviner, kement sorser, kement istro-

gel a ioa er vro. Displega a reas freaz dirazho ar pezh hen doa gullet : Mez ne oa ket unan en ho zoues goest da lavaret dezha eur gomz eeun ha sklear divar benn he ure. — Pharaon a venne koll he skiant-vad, pa deuas da zont d'ar boutailler-braz euz he gamarad-prizoun hag e lavaras d'ar Roue : « Aotrou, emezha, me a meuz manket hag hen an-zao a ran ama brema dirazoc'h. Epad m'edon er prizoun assamez gat offiser ar bara, me am-oa bet eun ure divar benn ar pezh a dlîe c'hoarvezout gant. Hogen er prizoun-ze, ne c'houzon ket perak, oa eun Israelit iaouank-flam e servich ar gouarnour. Heneze, goude beza klevet hon ureou penn-da-benn, a zisklerias d'eomp sklear ha diroufen ar pezh a dlîe c'hoarvezout ganeomp, hag a zo-zo-ken c'hoarvezet. Me a zo lakeat ganeoc'h adarre em c'harg, evel m'hen doa lavaret : ha va c'hamarad a zo bet krouget. Ah ! perak n'eus ket deuet sonj d'in kentoc'h euz an den iaouank-se ker fur ! »

Kerkent, ar roue a roas urz da zigass dezha he brizounier.

Joseph a ioa bet touzet he benn dezha evel ma veze great da velein an doueou-faoz. Lakeat oa dezha guiskamant ar zorserien hag, er stuz-se, oue kasset dirak Pharaon. Hema a lavaras dezha dioc'h-tu :

« Me am euz bet ureou ha ne m'euz kavet den betek-hen d'ho esplika d'in. Klevet em euz komz ac'hanoc'h evel euz a eun divinour dispar. « Oh ! a lavar Joseph, ne ket me eo, mez an Aotrou Doue a lavaro d'eoc'h petra'zo merket dre oc'h ureou. »

« Setu ama, a lavar Pharaon, petra'meus gullet : Seblantout a rea d'in edon em za var ribl ar ster pa velis e sevel anezhi seiz bioc'h lard ha kaer hag a



V.

BUGALE JACOB, EN EJIPT.

JOSEPH en doa tregont vloaz pa dennas Pharaon anezha a brizoun evit rei dezha an emell var an holl Ejipt. Dimezi a reas da Aseneth, merc'h da Butiphar, beleg euz a Heliopolis. Daou vap en devoue. Ar c'henta, a hanvas Manasse, ar pezh a zinifi ankounac'h, abalamour, emezha, e ra Doue d'in ankounac'haat ar poaniou am euz bet e ti va zad hag an trubiellou am euz bet epad va iaouankiz. An eil a hanvas Ephraim, da lavaret eo : « Kresk » abalamour m'en devoa Doue lakeat pep tra da greski etre he zaouarn en he vro nevez.

Gouskoude, dont a rea da veza guir ar pezh hen devoa lavaret. Deuet oa ar blavezioù eost puill. Ar ministr iaouank a ias e peb bro euz an Ejipt hag a velas dreizha he unan e zoa ed a-leiz ar meziou muic'h eget n'oa bet gueleit morse. E peb korn euz an Ejipt oue berniet semenn ha gorroet kalz ed e grignoliou ar Roue, dre ar c'heriou haz ar c'heriadennou. Rak an ed a ioa till evel an treaz e ribl ar mor.

Goude ar seiz blavez pinvidik, e teuas amzer ar gernez, gant ar seiz blaveziad treud. Er broiou trovar-dro, n'oa ket eur c'hreunen ed hag an dud,

darn anezho, o doa naoun. Joseph neuze a zigoras ar grinioliou en doa lakeat sevel e Memphis, kear genta an Ejipt, evit digemer ed ar blavezioù mad. Dre ma teue ar bopl, naoun dezha, da gaout Pharaon da c'houlenn bara, ar Roue a respounte : « Iit da gaout Joseph ha grit ar pezh a lavaro d'eoc'h. »

Mez a benn-nebeud amzer n'e ket ebken e Memphis oue dienez, hogen c'hoaz en holl broiou an Ejipt. An offiserien kasset gat Joseph a verzas neuze d'an Ejiptianed an ed a ioa gorroet e grinioliou ar Roue er c'heriou hag er c'heriadennou, en henvelep fessoun ma n'en doue ket unan ebken da glemm gat an naoun etouez sujidi Pharaon.

Hogen, ar brud o veza eat er broiou euz an amezegez e verzet ed en Ejipt, Jacob a lavaras d'he vugale :

« Petra' e d'eoc'h beza ker lezirek. Gouzoud a rit e zeus ed da verza e bro Pharaon. Perak ne dit-hu ket eta di da brena ed evit na varmimp ket gat an naoun. »

Breudeur Joseph a ias eta en hent etrezek an Ejipt, nemed Benjamin a oue dalc'het er gear gat Jacob gant aoun na vije erruet drouk gantha, o vont keit-all. Mont a rejont assamez gat bandennou all a iea ive da brena ed da gear Memphis. Rak ar gernez a iea var voassaet en holl bro Kanaan. E Memphis, ne vije ket roet eur c'hreunen nemed var urz Joseph. Pa erruont eta eno, eo red dezho mont dirak gouarner braz an Ejipt, a ioa ker brudet e peb leac'h abalamour d'he furnez.

Ugent vloaz a ioa eat a-biou abaoe m'oa bet guerzet gat he vreudeur. Ar re-ma ne c'hellent ket he anaout, savet ken huel goude ma ho devoa hen

diskennet ken izhel, er puns. He vreudeur a stouas eta dirazha betek an douar, evel m'ho dije great dirak ar roue he unan. Joseph ho anavezaz dioc'h-tu ha pa ho guelas var ho daoulin dirazha ne ellas ket miret da zonjal en ureou hen devoa great en he vugaleach. Dre ma ne oa ket Benjamin assamez gatho e fellas gantha, araok en hem rei da anaout dezho, gouzoud petra' oa deuet da veza he vreuri aouank.

An neuz a reas da veza dianaoudek euz ho langach ha kemeret hen doa eun den evit komz dezho euz he berz ha komz-rust zo-ken.

« Euz a be-leac'h e teuit ? »

« Euz a vro Kanaan ? »

« C'hui ne d'oc'h nemed ispiouned, deuet er vro-ma da velet dre be gostez e vezo essa dont a benn-anezhi. »

« Salokraz, Aotrou. Ni a zo deuet ama da brenaed. Ni a zo holl bugale ar memez tad; ne glaskomp nemed ar peoc'h ha ne garfemp ket ober an disterra drouk. »

« N'ho kredan ket : ha c'hui, m'oar-vad, a zo deuet dre ama da studia doare ar vro evit sailla varnomp divezatoc'h. »

« Aotrou, eur vech c'hoaz, daouzek breur ounp ganet euz ar memez tad, e bro Kanaan. Ar iaouanka ac'hanomp a zo chommet gat hon tad; egile n'ema ket mui euz ar bed-ma. »

« Lavaret a ran d'eoc'h ne doc'h nemed espionned. Oc'h penn-zo, brema me a oar penaoz en hem gemer evit gouzoud ar virionez penn-da-benn. Komzet oc'h euz d'in euz ho preur iaouanka. Mad; m'hen tou d'eoc'h dre benn ar Roue Pharaoni, ne deoc'h ket euz an ti-ma ken, na vezo digasset ama

ho preur iaouanka. Ra ze unan ac'hanoc'h eta d'he glask. Da c'hortoz ma tistroi, ar re-all a jommo ama er prizoun. Grit buhan, pe me, dre c'halloud Pharaon, ho koal-gasso evel espionned. »

Goude ar c'homzou-ze rust ha c'hoero, he vreudeur a ioa spountet. Ho lakaat a reas er prizoun epad tri dervez. Neuze ouent tennet er meaz ha digasset adarre dirak ar gouarner didruez. En dro-ma, n'oa ket ken tenval he benn hag he gomzou n'oant ket ker rust.

« Grit, emezha, ar pezh a c'houlennan diganeoc'h. Mar d'oc'h diulam, no pezo drouk ebed. Rak me am euz doujans Doue ha ne garfen ket ober an disterra gaou ouz den ebed. Setu-ama petra zo deuet em spered abaoe : « Unan ebken ac'hanoc'h a jommo ama er prizoun, epad ma tistroio ar re-all d'ho bro, gat an ed a zo prenet. Ha pa zeo guir e livirit d'in no c'heuz evidomp nemed santimantchou mad, e tigassoc'h d'in ho preur iaouanka evit ma velin dreizhon va unan a guir eo ar pezh oc'h euz lavaret d'in betek-hen. Mar grit kement-se, n'oc'h euz ket izom da gaout aour. »

Breudeur Joseph ne ellent ket lavaret nann. Gouskoude, ho devoa kalz nec'hamant. Ne ouient ket ec'h entente Joseph ho langach hag e lavarent entrezho : « Fall hor beuz great en eur ober d'hor breur ar pezh hor beuz great dezha. N'hor beuz ket selaouet he hirvoudou, na sellet ouz he zaelou ha setu ni brema er brassa anken. »

« A ne m'oa-me ket lavaret d'eoc'h, a lavar neuze Ruben, diouall da ober drouk d'ar c'hrouadur-ze; ha n'oc'heuz ket va zelaouet. Brema eo sounet heur ar venjans. »

Joseph dre ma kleve he vreudeur ec'h ober ho diviz hag ho c'hlemmou entrezho a zantas he galoun beuzet. Red oue dezha mont er meaz ha skuill kalz daelou. Da benn eun nebeud, e teuas adarre da gaout he vreudeur hag e roas urz d'he c'hoardou dirazho da jadenna Simeon ha d'her c'hass d'ar prizoun. Goudeze, var he c'her, an offiserien a leunas ho zier a ed hag a lakeas da bep hini anezho eb gouzoud dezha, var gorre an ed an arc'hant o devoa roet evit he baea. Neuze oue roet ive dezho boued evit ho beaj ha setu int-hi e vont en hent etrezek ho bro.

Erruet en un ostaliri, unan anezho a zigoras he zac'h evit tenna anezha eun dournad eiz bennak da rei d'he loened. Peger mantret n'oue ket pa gavas eno an arc'hant hen devoa roet da offiserien an Ejipt. Gervel a ra he vreudeur; diskuez a ra dezho an arc'hant. Nec'het-marò int. Ne ouzont ket petra da zonzal. « Petra en deuz c'hoant Doue eta da ober d'eomp, a lavarent etrezho ? » Kerkent a ma tistrojont da di ho zad, oue mall gatho kounta da Jacob ar pezh a ioa c'hoarvezet.

« Gouarner an Ejipt, emint-hi, a zo bet rust evidomp hag hen deuz zo-ken lavaret d'eomp ne d'oamp nemed espionned. Evit hom-ni or beuz lavaret dezha n'oamp ket eat d'he vro da ober drouk na da glask trabass. Evit diskuez dezha petra oamp, or beuz lavaret oamp daouzek breur, bugale d'ar memez tad. Unan a ioa maro. Ar iaouanka a ioa chomet e kichen hon tad. Mez hen n'hen deuz great van ouz hor c'hlevet. Simeon hen deuz lakeat er prizoun ha ni a zo bet kasset kuit gantha en eur lavaret : « Kassit ganeoc'h ho sac'hajou ed ha di-

gassit ama, eb mank, ho preur iaouank, evit ma velin pe c'hui a zo pe ne d'oc'h ket espionned. Neuze ebken, ar breur a zalc'han ama a vo laosket da redek hag o pezo konje da zont ama da brena ed ken aliez a ma karfoc'h. »

Ar patriarch koz a ieas tenval he benn o klevet ar c'homzou-ze. Ne ouie petra da zonzal var bouez ar gouarner hag an digemer hen doa great d'he vugale. Mez nec'hetoc'h oue c'hoaz pa deuas ar re-vugale. Mez hini gantha an arc'hant en doa roet evit an ed. Strafillet-holl oant hag aoun braz o doa da veza tamallet evel laeroun ha fripouned. Jacob a venne koll he benn gat ar zonz ebken e rankje dispartia diouz he vap iaouank.

« Kemeret a rit diganhen va holl bugale, emezha. Setu Joseph n'ema ket mui : Simeon a zo er prizoun hag e fell d'eoc'h c'hoaz tenna diganhen va Benjamin ! varnhon-me, keaz koz, eo e kuez an holl reuziou-ma ! »

« Va zad, a respountas Ruben, ma ne zigassan ket Benjamin en-dro, d'ar gear, me c'houlenn ma vezo lakeat va daou vap d'ar maro. N'oc'heuz nemed her fiziout ennhon ; me a dou d'eoc'h e tistroio d'ar gear eb an disterra drouk. »

« Biken, a lavar Jacob ; nan, biken ne dei va map d'oc'h heul. He vreur a zo maro ; ne jomm nemetha ganhen euz va muia-karet Rachel. M'ar tiouesse drouk gat hema en hent, ho tad, guen-kann he vleoa ha bruzunet gat ar c'hlae'har, n'hen devezo ken da ober nemed disken er bez. »

Kaer o doa porsu varnha, an hini koz n'ho zelaoue ket. Gouskoude ar gernez a greske goassoc'h goaz ha bemdez e vihanea ar bourvizion. Ker ber

oa eat an traou ma lavaras Jacob anezha-he unan d'he vugale :

« Distroit d'an Ejipt, emezha, ha poaniit da gaout c'hoaz eun nebeud ed. »

« Ni ne c'houlennomp ket vell, a lavar Juda. Hogen gouarnner an Ejipt en deus touet d'eomp n'hor bezo ket eur c'hreunen ma ne vez ket hor breur iaouank ganeomp. List eta Benjamin da zont ganeomp ha n'hor bezo nep poan e kaout bevans. Anez-se, eo koulz chomm er gear. Rak an den-ze en deuz lavaret d'eomp freaz ha grouns : « Ma ne vez ket ganeoc'h, ne vezoc'h ket digemeret ama. »

Jacob a glaske digareziou.

« Pe seurt izom o poa, emezha d'he vugale, da gomz d'an den-ze euz ho preur iaouank ? Ha n'oañ-me ket poaniet aoualac'h, m'ar lakit poaniou nevez da goueza varnhon ? »

« Mez, tad, a lavar ar vugale d'ho zro, ar gouarnner en deus goulennet diganeomp kalz traou divar benn hor famill. Goulennet en deuz hag hon tad a ioa beo c'hoaz ; ha breudeur all or boa. Ne ellemp na tevel na lavaret geier. Oc'h penn-ze, daoust a ni a elle gedal hen devije lavaret d'eomp : « Digassit d'in ho preur ? »

Juda a drouc'has ber da holl digareziou an hini koz.

« Va zad, emezha, red eo d'eoc'h lezel Benjamin da zont ganeomp pe e rankimp holl mervel gat an naoun, ni hag hor bugale. Me a gemer ar garg euz ho map ha diganhen-me her goulennoc'h. Ma ne zistro ket ganhen-me d'ar gear, n'am pardounit biken ; hag oc'h-penn-ze, perak kemeret kement a neac'h evit an nebeud dervezioù ma vezo ho map

e meaz kear. Ma ne vije ket bet kement a droidel-leréz ganeoc'h, oamp distro brema. »

« Va bugale, a lavaras Jacob en eur huanadi, pa zeo red, grit evel a garfot. Klaskit prezantchou e touez ar pezh or beuz a vella ha kinniguit anezho d'ar gouarnner : Goularz, mel, balzam, myrrh, tourmantin hag alamandez. Kassit c'hoaz ganeoc'h daou c'hement arc'hant evel a ioa en ho sier evit ne vezoc'h ket tamallet evel laëroun. Kassit ho preur ganeoc'h ha kit adarre dirak mestr an Ejipt. Pedi a ran an Doue holl-galloudek da ober dezha beza mad evidoc'h. Plijet gantha digass assamez ganeoc'h, d'ar gear, ho preur Simeon a zo er prizoun hag ar c'heaz-ma, Benjamin ! Evidon-me, me'jommo ama va unan, evel eun den dizher ha dilezet gat an holl. »

Antronoz, karget a brezantchou hag a arc'hant breudeur Joseph a gerze adarre varzu an Ejipt, ha Benjamin assamez gatho.





VI.

JOSEPH A EN HEM RO DA ANAOUT D'HE VREUDEUR.

Da errujont e Memphis, bugale Jacob a gavas Joseph e touez eun toullad tud deuet di da brena ed, euz a gement korn a ioa en Ejipt. Daoust dezha m'hen doa kalz prez labour, ar gouarner a velas gouskoude an nevezidi ha laouen braz oue he galoun pa velas Benjamin deuet gatho.

« Kassit em palez an dud-se euz Kanaan, a lavaras goustadik da offiser he di, ha lakit ober lein vraz. Rak me a fell d'in rei da breja d'an dud-se, hirio. »

Hema a reas sin da vugale Jacob hag ar re-ma a ieas var he lerc'h er palez. Kredi a c'hellit n'oant ket eb enkreuz. « Eb mar ebet, a lavarent entrezho, oump digasset ama abalamour d'an arc'hant a zo kavet en hor sier. Tamallet e vezimp adarre e gaou ha stlejet er prizoun. »

Evit distrei divarnho an taol-ze, e lavarjont da vestr braz ar palez petra' ioa erruet gatho.

« Aotrou, emezho, bezit ar vadelez d'hor selaou eur moment ebken. Ni a zo bet c'hoaz en Ejipt e prena ed. Pa hor beus digoret hor sier en Ostaliri oump bet mantret o kaout enno an arc'hant hor boa roet. Digass a reomp anezha d'eoc'h en dro,

diner evit diner, hag ouspenn-ze ar pezh a zo red evit an ed a verzoc'h adarre d'eomp. Ne ellomp ket gouzout na lavaret piou hen deffe lakeat an arc'hant-se en hor sier. »

« Bezit eb aoun, a lavar dezho an offiser gat dousder ha ne gemerit ket a neac'h. Ho Toue ha Doue ho tad eo hen deuz lakeat d'eoc'h an tenzoriou-ze en ho sier. Rak evidon-me am euz sonj mad ho c'heuz paet kement a zo eat ganeoc'h. »

Goude beza komzet ker kaer outho e zeas da glask Simeon en he brizoun hag ho c'hassas holl e palez Joseph. Eno e lakeas digass dour dezho da voalc'hi ho zreid (ervez giz ar vro); rei a reas urz da vaga mad al loened, ha goudeze e zeas da lakaat aoza ar pred. Bugale Jacob a ioa evel tud dall. Ne ententent netra en digemer mad a ioa great dezho. Pe e zoa troet evitho ar gouarner-braz, pe otramant edo e klask ober dezho eun taol fall bennak ? Ne ouient ket.

Gouskoude, da c'hortoz kreisteiz, heur merket gat Joseph evit ar pred, e tispakchont er zal ar prezantchou kaer ho devoa digasset dezha.

D'an taol a gresteiz, Joseph a denas dirazho. Goude beza kinniget dezha ho frezantchou pinvidik e stoujont dirazha betek an douar. Joseph n'oa ket mui an den rust ha rog en devoa great dezho eur ouall digemer, er vech kenta. Ho zaludi a reas gat karantez ha goulenn a reas digatho kelou euz ho familh.

« Ho tad, emezha, ar c'heaz koz-se ho c'heuz komzet anezha d'in a beo eo c'hoaz ? a iac'h eo ? »

« Hon tad, ho servicher, a zo beo c'hoaz ha iac'h, a drugare Doue. »

Neuze, bugale Jacob a zaoulinas adarre dirak ar gouarner evit he drugarekaat euz he vadelez evitho. Joseph a dro var-zu Benjamin ; ne c'hell ket her gueleb eb ma teu da zonj dezha euz Rachel, ho mam ker karantezuz, hag e lavar :

« Hag ema eo ar breur iaouank ho c'heuz komzet anezha d'in ? »

« Ia, Aotrou, emint-hi. »

Lavaret a ra neuze da Venjamin :

« Va map, ra vezo Doue ganeoc'h ! »

Setu kement a ellas da lavaret. Andaelou a zave d'he zaoulagad ; he galoun a deuze. Mont a ra da guzet d'he gampr hag eno e tiroll da ouela. Goude beza goalc'het he vizaj, e tiskenn adarre laouenbraz da gaout he vreudeur.

« Servichit lein, a lavar-hen d'an offiserien. » Teir daol a ioa savet er zal. Ouz ar genta n'oa nemed Joseph : Bugale Jacob a ioa ouz an eil hag an offiserien ejipsianed ouz an drede. Rak difen a ioa d'an Ejipsianed drebi ouz ar memez taol gat an Hebreed abalamour, var ho meno, ar re-ma a ioa tud dizakr. Joseph a renkas he vreudeur oc'h taol dre oad, adalek Ruben, ar c'hossa, bete Benjamin ar iaouanka, ken na oant sebezet. Hogen, mantret ouent kement-all pa veljont lakeat dirak Benjamin pemp guech kement ag a ioa dirak peb hini euz ar re-all. Ar pezh a ioa eur merk sklear euz ar garantez vraz en doa ar gouarner evit he vreur iaouank. Oc'h penn-ze, joa vraz oa gatho dribi hag eva gat gouarner an Ejipt.

Antronoz Joseph a roas urz da vestr braz he balez da rei da dud Kanaan leiz ho zier a ed. « Ouspenn, emezha, lakaat a reoc'h ho arc'hant en ho

zier hag e sac'h ar iaouanka e kuzoc'h va zass arc'hant. »

Ar pezh en doa gourc'hemennet a oue great penn-da-benn. Bugale Jacob a gimiadas diouz Joseph hag antronoz mintin-mad edont en hent, fouge enno da veza bet eun digemer ker chentil. Eat oant e meaz kear hag edont e kreiz ar meziou pa c'halvas Joseph he c'houarner da vont d'he gaout.

« Kit buhan ha-buhan, emezha, var lerc'h an dud-se. Grit d'ho servichourien kregi enno ha lavarit dezho evel-hen : « Petra eo d'eoc'h ober drouk goude kement a vad a zo bet great d'eoc'h ha perak mont da laerez tass va mestr, an tass a vez gantha bemdez ec'h eva hag a zervich dezha da zivinoud an traoù da-zont. Eun taol ho c'heuz great euz ar re zivaloa. »

Dre an tass-ze, e guirionez, eo ezedo Joseph e vont da zivinout ha da anaout ar santimantchou a ioa e kaloun he vreudeur en andret Benjamin. — Ha karet a reant-hi map Rachel ? ha n'oant ket prest d'hen dilezel, ma kavont an tu, evel m'oa bet dilezet he unan ?

Ar gouarner a ieas eta varlerc'h bugale Jacob ; ho diarben a reaz hag e tamallas anezho seac'h ha grouns da veza laeret tass he vestr. Pa glevchont ar c'homzou rust-se ne eljont ket miret da vont drouk enno.

« Penaoz, emezho e c'hellit-hu komz evel-se ouzomp-ni ha kredi e vemp tud da ober eun henvelep torfed ? Gouzout a rit, aotrou, or beuz digaset en-dro an arc'hant or boa kavet en hor sier, en dro genta m'oamp bet ama, ha brema e vijemp eat da laerez arc'hant hag aour ho mestr ! Tremen a

raffemp evit tud diskiant. Oc'hpenn-ze, digorit ar zier ha ma vez kavet an tass, ra vezo lakeat al laer d'ar maro ha ra vezimp holl ho sklaved ! »

« Euz ar pezh a ginniguit d'in ne gemerin nemed eul loden ebken. An himi ac'hanoc'h a vezo kavet an tass en he zac'h a jommo ama evel sklaf. Ar re-all a ello mont d'ar gear. »

Mall oue gatho dizamma ho zier hag ho digeri. Ar mevel ho furchas an eil varlerc'h egile, sier ar re gossa da genta. N'hen devoa kavet netra pa erruas gat sac'h Benjamin ; Mes kerkent a m'oue digoret hema, e veljot an tass e lugerni ennha.

Bugale Jacob a jommas sounnet evel pa vijent skoet gat eun tarz kurun. Ne ellent ket nac'h ; ne ellent ket kredi ken nebeud e vije laer ho breur iadouank. Ne ouient ket e pedu en hem drei. Mez regi a reont ho dillad ha ioual a reont a-forz gat an dizesper. Samma a reont adarre an ed var an ezen ha setu hi e tistrei e kear, assamez gat an Ejipsianed.

Joseph a ioa c'hoaz en he balez. Kasset oue he vreudeur dirazha dioc'h-tu ha kùeza' rejont holl d'an daoulin dirazha evel torfetourien dirak ho barnier. Ar gouarnner a gomzas outho var eun ton rust : « Perak, emezha, e rit-tu traou evel-se d'in-me ? a ne ouzoc'h-hu ket ne meuz ket va far e touez an divinourien ? »

Juda eo en devoa respountet euz a vuez Benjamin. Setu perak e kemeras an hardisegez da gomz ouz Joseph, en hano he vreudeur, evit klask her gounid.

« Aotrou, emezha, n'or beuz netra da lavaret na digarez ebed da glask evit diskuez e zoump

guenn a bec'hed. Doue eo a sko brema varnomp abalamour d'eun torfed or beuz great pell-zo. Setu ni holl prest da veza ho sklaved assamez gat an hini a zo an tass en he zac'h. »

« Doue ra viro na raimp d'an hini a zo didamall evel d'an hini a zo koupabl. Al laer a jommo ama ; c'hui distroit d'ar gear, da gaout ho tad. »

Pa glevas Juda komz euz he dad, e za er meaz anezha he unan. Kemeret a ra hardisegez, tostaat a ra euz he varner ha komz a ra outha gat kement a galoun, ma teu an dañlou e daoulagat an holl.

« Aotrou, emezha, roit konje d'ho servicher da lavaret d'eoc'h eur gomz ebken ha ne fachit ket ouz her c'hlevet. Rak me' zo ho sklav paz'eo guir, goude Pharaon, oc'h mestr an Ejipt. Sonj ho c'heuz marvad, euz an dro genta m'oamp deuet ama. Neuz e c'houlenjoc'h diganeomp ha beo oa hon tad hag unan bennak all euz hor breudeur ? — Ia, a lavarjomp d'an aotrou, hon tad a zo koz, mez beo eo c'hoaz. Eur breur iadouank or beuz ive ganet dezha en he gozni ha chommet e unan, euz a zaou ma oant bet euz he c'hreg Rachel, a garrie kement. Unan euz ar vugale-ze n'ema ket mui er bed-ma. Setu perak en deuz hon tad kement a garantez evit hor breur iadouank. Lavaret a rejot d'eomp hen digass ama abalamour ho poa c'hoant da ober he anaoudegez, ha pa o devoue ho servichourien diskleriet d'eoc'h en dije kement-se roet taol ar maro d'hon tad e lavarjoc'h d'eomp : « Ma ne deu ket ho preur ganeoc'h, ne dal ket ar boan d'eoc'h distrei ama. Me n'ho tigemerin ket. » — Red oue d'eomp kounta d'hon tad ar pezh en doa hon aotrou goulennet diganeomp, ha pa gomzas d'eomp euz ar

veaj a dliemp da ober adarre en Ejipt e renkehomp lavaret dezha ne vijemp ket digemeret ganeoc'h, ma ne leze ket he vap iouank da zont ganeomp :

« Gouzoud a rit, a lavaras d'eomp neuze en eur ouela, e deuz Rachel roet d'in daou vap. Unan anezho a ioa eat var ar meaz ha c'hui ho c'heuz lavaret d'in oa bet drebet gat eul loan gouez bennak. Ar pezh a ouzoun eo, ne ket distroet abaoe d'ar gear. Mar kassit hema ive ganeoc'h ha mar tiouez eun drouk bennak gantha en hent, e rooc'h d'in taol ar maro. » Mar tiouesse eta d'in-me mont dirak va zad ebar c'hrouadur-ze a zo he ene ker stag outha, e varvo gat ar c'hlaç'har hag ho servicherien o devezo beuzet he zaoulagad en daëlou hag hen diskennet er bez. »

« Evit miret oc'h kement-se, plijet ganeoc'h, va aotrou, va c'hemeret-me evit ho sklav e leac'h va breur iaouank. D'in-me eo dougen ar boan; rak me eo a zo bet kred evit ar c'hrouadur-ze dirak va zad. »

« Ma ne zistro ket ganhen-me, am euz lavaret d'am zad, e lakeoc'h ar beac'h da gueza varnnon hag e c'houlennan na bardounoc'h d'in birviken. Truez eta ouz ar c'hrouadur-ze, ma tistroio gat he vreudeur d'ar gear, ha me a jommo ama d'ho servicha evel eur sklav. Rak evidon-me ne c'hellan ket mont dirak va zad ma ne vez ket ganhen map he garantez; ha ne fell ket d'in her gueleit e vervel gat an dizesper. »

Joseph n'he bade ket mui. N'oa ket evit derc'hel he zaelou. Ober a ra sin d'an Ejipsianed da vont er meaz evit n'ho devije ket gueleit ar pezh a iea da dremen. Pa ne deus mui nemetho, he galoun a

fraill hag an daelou a ruill puill euz he zaoulagad, ha gat eur vouez ag a dregern dre holl palez Pharaon e lavar d'he vreudeur :

« Me eo Joseph ! ha va zad, a beo eo c'hoaz ? » He vreudeur a ioa ker spountet ma ne c'hellent ket lavaret zo-ken : ia.

» Tostañt ama, a lavaras dezho neuze gat dousder. Pa ouent deuet en he gichen, e lavaras dezho goustadik : « Ia, me eo ar Joseph ho c'heuz guerzet evel sklav d'ar varc'hadourien a ioa e vont d'an Ejipt. Mez bezit dineac'h; ne gemerit ket re a boan. Rak Doue eo en deuz great an taol-ze evit va digass en Ejipt da c'hortoz ac'hanoc'h ha d'ho saveitei. Daou vloaz a zo eo deuet ar gernez er vro; pemp bloaz e pado c'hoaz hag e doug an amzer ze arabadeo sonjaladana gortoz tam eost. Abalamour ma z'eo plijet gat Doue va digass ama en ho raok e kavoc'h ama peadra da veva epad an amzer-ze. Gueleit a ellit eta n'eo ket c'hui eo ho c'heuz va digasset ama, mez Providans an Aotrou Doue. Hen eo en deus great ac'hanon tad mager Pharaon, mestr braz he balez ha gouarnner an Ejipt. »


« Brema kit buhan da gaout va zad ha livirit dezha : « Setu ama petra' lavar d'eoc'h ho map Joseph : « Doue en deus va lakeat da c'houarnner en Ejipt. Deuit ama eb dale. Mont a reoc'h da jomm e kreiz meziou pinvidik Jessen, gat ho pugale, ho pugale-vihan, ho mevelien, ho mitizien, ho c'hejenned hag ho tenved. Beva' reoc'h tost d'in-me ha me a bourveo ac'hanoc'h a bep tra epad ar pemp blavez kernez a zo c'hoaz da zont. Evel-se ne varvoc'h ket gat an dienez, na c'hui nak hini euz ho pugalignou. »

Bugale Jacob, pa glevchont ar c'homzou-ze a jommas evel tud saouzanet. Goulen a reant entrezo a Joseph a ioa dirazho pe ma n'oat ket ec'h ober goap anezho. Mez Joseph, evel p'hen dije lennet en ho c'haloun, a lavaras :

« Ho taoulagad n'int ket trellet na daoulagad va breur Benjamin ken-nebeud. Ia, me eo Joseph a velit dirazoc'h; me eo Joseph a glevit e komz ouzo-c'h. Kit eta da gass kelou d'am zad e zoun savet e renk huel ama, en Ejipt; lavarit dezha an traou kaer ho c'heuz gueleit hag astit affo hen digass ama. »

Goude beza komzet evel-se e lammas da boket d'he vreur Benjamin hag o daou oant dirollet da ouela. Poket a reas ive goudeze d'he holl vreuteur, he zaoulagad ato beuzet a zaelou.

Neuze, goude m'ho devoa gueleit karantez ho breur evitho e kemerjont hardisegez da gomz outha.



VII.

ISRAEL EN EJIPT.

AR brud a redas dre ar palez en devoa Joseph anavezet he vreuteur e touez an dud-se a-veaz bro deuet d'an Ejipt. Ar c'helou-ze a reas kalz plijadur d'ar roue Pharaon ha d'he holl offiserien; ha Pharaon a lavaras da Joseph : « Kassit kannad d'ho preuteur euz a berz ar Roue ha lavarit dezho : « Sammit mad ho loened ha distroit da vro Kanaan. Ac'hano, c'hui a zigasso d'in-me, ama, ho tad gat he holl familh. Ho loden a vezo roet d'eoc'h en holl madou an Ejipt hag evit ho maga e vezo roet d'eoc'h ar guella ed a zarev er vro. Kassit ive ganeoc'h kement a vezo red a girri evit dougen betek-ama, ar vugale, ar merc'hed hag an holl annez, ha ma teuoc'h da jomm evit-mad er vro-ma ker pinvidik. » Ar roue n'he c'houlenne digatho nemed eun dra : « Hastit affo digass ho tad betek ennhon. »

Ne oa ket diez da vugale Jacob ober ar pezh a ioa gourc'hemennet. Joseph a roas dezho kirri e-leiz, bevans evit ho beaj ha da bep hini diou zae-nevez-flam. Benjamin zo-ken en devoue pemp euz ar re gaerra ha tri-c'hant pezh arc'hant. Da Jacob oue kasset kement-all hag, ouspenn, dek azen sammet varnho ar pezh a ioa a vella en Ejipt ha dek azenez evit dougen ar bevans.

Joseph a gimmiadas diouz he vreudeur hag en eur zispartia dioutho e lavaras dezho dioual-mad na zafche etrezo e douk an hent.

Bugale Jacob a zistroas eta euz an Ejipt da vro Kanaan. Kerkent a ma veljont ho zad, en hem lakejont da lavaret dezha var eur vouez : « Ho map Joseph a zo beo : Hen eo a zo brema e c'houarn an Ejipt. »

Ar c'heaz-koz, an den santel Jacob, pa glevas ar c'helou-ze, a jommas mantret. Henvel oa ouz eun den di'hunet e kreiz eun ure ha poan hen doa e kredi ar pez a lavarent. Kredi a renkas gouskoude pa glevas gat he vugale petra' ioa bet erruet, pa velas ar c'hirri deuet euz an Ejipt, pa velas an traou kaer digasset dezha e prezant. Neuze deuet enha he unan ha beuzet er joa, e lavaras : « Va map Joseph a zo beo. » Me ne m'euz mui nemed eun dra da c'houlén : her gulet abarz mervel. D'eomp eta dioc'h-tu d'an Ejipt. »

Ar patriarch santel a ias eta en hent evit an Ejipt gat kement menu-mad hen devoa. Gouskoude, pa ziouezas e Bersabee, e kic'hen ar puns hanvet puns al le (pe an toui), er vro-ze el leac'h m'oa bet guechall telt Abraham hag Isaac, el leac'h ma' ma an disparti etre an Ejipt ha bro Kanaan, e chommas aza evel eun den hag hen doa diegi e vont kuit euz an douar-ze a ioa bet prometet ken aliez a-veach gat Doue dezha ha d'he lignez.

Kinnig a reas eno eur sakrifiks da Zoue Isaac, he dad hag en hem roas da gousket.

E kreiz e gousk e klevas eur vouez oc'h he c'hervel :

« Jacob, Jacob ! »

« Setu me ama, Aotrou. »

« Me eo Doue ho tad. It eb aoun da vro an Ejipt. Eno me ho lakai da veza tad eur bobl niveruz. Er vro nevez-se, me a vezo ganec'h ha me ho tigasso ac'hano d'ho pro goz p'hen devezo Joseph serrèt d'oc'h ho taoulagad. »

Komzou Doue a roas dezha nerz ha setu ma kuita puns al le. He vipien her lakeas gat ar gragez, ar vugale hag ho holl danvez var ar c'hirri digasset dezho gat Pharaon. Etre mipien, merc'hed ha bu gale vihan, famill Jacob a ioa enni dek den ha triugent, eb kounta gragez he vipien.

Kerkent a m'hen hem gavas var douar an Ejipt, Jacob a gassas Juda araok bete Joseph da lavaret dezha oa erru he dad hag her pedi da zont d'he ziambrouk bete bro Jessen. En eul lamm ema Joseph var he gar ha mont a ra buhan d'al leac'h merket gat he dad, Raktal m'her guelas, Joseph a lammas da boket dezha hag her briata'ra pell amzer en eur skuilla forz d'elou a joa.

« Va map, a lavare Jacob, brema e varvin laouen pa zeo guir en deus Doue roet d'in an eurvad d'ho kulet eur vech c'hoaz ha d'ho lezer er bed ma var va lerc'h. »

Kerzet a rejont neuze etrezek bro Jessen. Eno hen devoa Joseph c'hoant d'ho c'hass abalamour ne oa ket guelloc'h karter en Ejipt hag abalamour ne vijent ket mesket gat bugale Misraim a ioa tud fall ha troet d'an idolatri. Kemenn a reas eta d'ar roue Pharaon oa deuet he dad hag he vreudeur euz a vro Kanaan bete douar Jessen hag e kassas pemp anezho d'he gaout.

« Pe seurt labour a rit ?, a c'houlén digatho ar

Roue. » — « Ni a zo pastored denved, evel ma z'eo bet hon tadou koz en hor raok. E bro Kanaan eo dizec'het ar peuri, hon anevaled n'he gavont mui eno eur ieoten zo-ken da zrebi ha setu perak e pedomp ac'hanoc'h da rei konje d'ho servicherien da vont da jomm var douar Jessen. »

Ar roue neuze a lavaras da Joseph :

« Holl vro an Ejipt a ginnigan d'eoc'h. Kemerit evit ho tad hag ho preudeur an dachen a gavoc'h ar guella. A greiz va c'halon, e roan dezho douar Jessen : ha ma c'hanavezit lod en ho zoues ag a ve pastored guizie, roit dezho an emell euz va loened-me. »

Goudeze, Joseph a gassas he dad da gaout ar Roue. Goude beza saludet Pharaon ha reketet dezha peb seurt mad, hema a c'houlennas digatha he oad :

« Deiziou va felerinaj, a respount Jacob, a zo bet ber ha fall. Dek vloaz ha c'huec'h ugent am euz ha ne bakin ket oad va zadou koz. »

Eur vech c'hoaz e roas he vennoz d'ar Roue hen doa saveteet dezha he famil, hag e zeas da jomm e bro Jessen. Joseph eo a reas dezho mont d'ar vroeze ker pinvidik hag a roas dezho epad holl amzer ar gernez peadra da veva.



VIII.

KOMZOU DIVEZA JACOB.

Ar patriarch Jacob a vevas c'hoaz seitek vloaz goudeze var douar Jessen. Erfin, d'an oad a zeiz vloaz ha seiz-ugent, pa velas en-dro dezha kement a vugale vihan e santas er vad n'oa ket pell ar-marro dioutha. Gourvezet var he vele, he zaoulagad tenval ar zant koz a lakeas kemeunn da Joseph dont d'he gaout evit klevet ar pezh a felle dezha a vije great.

« Va map, emezha, araok dispartia diouzoc'h e c'houlennin c'hoaz diganeoc'h eur merk a garantez. Touit d'in ne vezo ket diskennet va c'hov e-douar an Ejipt. C'hui a gasso va relegou er meaz euz ar vro-ma hag ho lakaio, e douar Kanaan, e bez Abraham hag Isaac. »

« Va zad, eme Joseph, ar pezh a c'houlennit a vezo great penn-da benn. »

« Touit-hen d'in, va map. »

Joseh hen touas. Kerkent he dad a lezas he benn da guezha var he vele hag a en hem lakeas da drugarekaat Jehovah.

Goude eun nebeud amzer Joseph a glevas oa falleat he dad hag a fellas dezha her guelet eur vech c'hoaz araok he varo. Dont a reas eta betek ennha gat he zaou vap, Ephraïm ha Manasse. La-

varet a rejot d'ar patriarch deuet ker fall he zaoulagad ma ne anavezé mui ar re a ioa en dro d'he vele :

« Setu ho map Joseph deuet d'ho kuelelet. » Nerz aoualac'h a gavas c'hoaz evit sevel en he c'hoazez, ha neuze e lavar da Joseph ar c'homzou-ma : « Va map, an Doue a zo en hem ziskuezet d'in e Luza, e bro Kanaan, a vennigas ac'hanon hag a lavaras d'in ar c'homzou ma : « Ker stank e lakign ar vugale en ho lignez ma vezoc'h tad da eur bobl braz, hag an douar-ma a roin d'eoc'h ha d'ho pugale var ho lerc'h, evit ma vezo d'eoc'h da-viken. Ho taou vap, Ephraïm ha Manasse, ganet var douar an Ejipt araok ma oan deuet ama, a fell d'in a ve great dezho evel d'am bugale Ruben ha Simeon. Ho lod o devezo eta ive en douar pa vezo rannet entrezo. Hogen ar vugale-all a elfe dont d'eoc'h goude va maro-me, n'o devezo ket eul loden disparti; mez Ephraïm ha Manasse a ranno gatho. Kement-ma a fell d'in ober evel an diveza merk a garantez a c'hellan da rei d'ho mam Rachel, va fried keaz a varvas e bro Kanaan, pa edomp e tistrei euz ar Mezopotamii. Siouaz ! d'an nevez amzer oa, var hent Ephrata?.. Eno eo e savis dezhi eur bez.

A dreuz he zaelou e seblantas dezha guelelet daou graouadur daoulinet e kichen he vele.

« Piou eo ar vugale-ze, emezha ? »

« Va zad, a lavaras Joseph, ar re-ze eo an daou vap en deuz roet d'in an Aotrou Doue, e bro an Ejipt. » — « Grit eta dezho tostaat ouzin, ma roin dezho va bennoz. »

Pa ouent deuet betek-ennha, an tad koz a zigoras he zivrec'h, a stardas ar vugale-ze var he galoun hag a lavaras en eur ho briata :

« Ra vezo benniget Doue, va map, an Doue a vadelez hen deuz roet d'in ar c'hraas d'ho kuelelet eur vech c'hoaz ha da starda ho pugale var va c'halloun ! »

Joseph a gemeras he vugale euz a dre zivrec'h he dad. Daoulina' ra dirazha neuze evit he drugarekaat euz an hénor braz a rea da Ephraïm ha da Vanasse ha goudeze e lakeas he vugale, unan a beh-tu d'he dad ; Manasse, ar map hena, a ioa en tu deou hag ar iaouanka, Ephraïm, en tu kleiz. Mez Jacob a groazias he zivrec'h en henvelep fessoun ma tioueze he zourn deou a-zioud Ephraïm hag he zourn kleiz a-zioud Manasse hag ho bennigen en eur lavaret :

« Ra blijo gat an Doue o deuz servichet va zud kôz, Abraham hag Isaac ; gat an Doue hen deus va maget adalek va c'henta iaouankiz bete vrema, gat an Doue hen deus digasset eun eal evit va diouall e kreiz an danjeriou, rei he vennoz d'ar vugale-ma ! Ra zougint va hano hag hanoiou va zadou koz Abraham hag Isaac ha ra zavo anezho eun niver braz a dud var an douar ! »

Joseph a grede e fazie he dad. Kregi'ra eta en he zourn deou evit he asten var benn Manasse : « hema eo va vap hena, emezha. Lakit ho tourn deou varnha. » — « Nan, va map, a lavar Jacob. Me oar petra' ran. Manasse a vezo tad da eun niver braz a dud ; hogen Ephraïm a vezo savet huelloc'h egetha hag he famill a vezo brassoc'h. — Va bugale a lavaras hen c'hoaz, Israël a vezo benniget ennoc'h hag e vezo divezatoc'h lavaret : « Ra vezoc'h benniget gat Doue evel ma z'eo bet benniget Ephraïm ha Manasse. »

Ar patriarch santel a gemennas goudeze d'he holl vugale dont en dro d'he vele ha gat eur vouez freaz e lavaras da bep hini he lod :

« Deuit ama, bugale Jacob, emezha, da glevet gat ho tad ar pezh a ziouezo ganeoc'h en amzer da zont. »

Holl e teujont en dro d'he vele hag eno e c'hortozent he gomzou gat doujans ha gat aoun.

« Ruben, emezha, c'hui va map hena, c'hui va skoazel, ho c'heuz roet d'in melkoni, goalc'h va ene. C'hui a dlie beza ar c'henta e-touez ho preudeur; mez ho kloar a zo eat da netra evel eur veraden zour en eun douar seac'h, abalamour hoc'h bet divez aoualac'h evit dishenori ho tad. »

« Ha c'hui, Simeon ha Levi, a zo bet a-unan ec'h ober an drouk, o laza tud Sicheim hag o lakaat an tan - voall en ho c'hear var eun digarez ebken; c'hui, bet mignoured-vraz da ober an drouk, a vezo disparti etrezoc'h. N'ho pezo hini ac'hanoc'h eul loden-bro en he hano ha red e vezo deoc'h beva ama hag ahont e touez ho preudeur hag ho bugale var holl douar Israel. Milliget ra vezo ho kounnar.

An tri vap reuzeudik-se a grene dirak an taoliou pounner-ze a skoe varnho Justis an Aotrou Doue.

Ho breudeur n'oant ket ken nebeud eb enkrez. Mez tal Jacob a laoueneas hag he lagad, evel pa vije sklereat, a glaske guelet he bevare map.

« Juda, emezha, ho preudeur a rei' e peb leac'h ho meuleudi. Dindan ho tourn hoc'henebourien a blego hag ho preudeur zo-ken a zaoulino dirazoc'h. Va map Juda eo al leon a lam var he breiz; eo al leonez gourvezet e kichen he re vihan : Piou a gre-do he dihuna ? AR STUR PE GOALEN AR MESTR NE VO

KET TENNET DIGAT JUDA HAG AN HINI EN DEUZ GAL-LOUD DA ZOUGEN LEZENNOU A JOMMO EN HE DI KEN NA C'HOULAOUO AN DEIZ KAER MA C'HANO AR MESSIAS GORTOZET GAT AN HOLL VROIOU. »

Goudeze, Jacob a lavar, evel dar-red, istor he vugale-all.

Issakar, kren ha sot evel eun azen, a blij dezha he zouar abalamour e ro dezha frouez eb skuisder, ha guelloc'h e kar soubla d'an holl ha paea kargou ha guirioù skrijuz eget caout trabass.

Dan a vezo galvet da varn he bobl hag holl broiou Israel. Fur e vezo evel an aer, kuzet en hent, a lamm gat troad ar marc'h evit pilat an hini'zo varnha.

Gad a vrezekai dirak he vreudeur, ha distrei a rei d'ar gear gat ar gounid.

Meziou Azer a roio d'ar Rouanez bara euz ar guella.

Zabulon a ielo da jomm var ribl ar mor hag a vezo mestr var an holl borziou a deu ennhou listri, bete kear Sidon.

Nephtali a lamm goassoc'h eget eur c'haro ha komz a rei en eur fesoun dudiuz.

Ne jomme mui da gomz anezho nemed daou vap Rachel. Ar patriarch koz a deu an dour en he zaoulagad.

« Joseph, va map Joseph, emezha, eo ar vinien koant ha seder, a zispak skourrou kaer betek en tu-all d'ar voger. Goasket eo, goal-gasset eo, ten-na' rear birou varnha. Kaer a zo ober, Joseph ne goll ket kaloun. Doue Jacob a dorr he liammou, hen tenn a brizoun hag her laka da veza tad mager ha salver ar bobl a Israel. Doue ho tad, o va map,

ho tiouallo. An holl-c'halloudek a skuillo puill var-noc'h bennoziou an Env, gat ar glao hag ar gliz ; bennoziou an deoun, gat an eienennou pinvidik, hag ar bennoziou c'hoaz kaerroc'h, ar rea ro bugale ha leaz d'ar mammou. — Ar bennoz a ro d'eoc'h ho tada vo treac'h d'an hini en doa bet he unan digat Isaac hag a jommo var ho lignez ken na deui AN HINI E MAOR VAR C'HED ANEZHA ABAOUE KEIT AMZER. »

Ha c'hui, Benjamin, bleiz laer, dioc'h ar mintin, c'hui a zrebo ar preiz ha d'an abardaez e rannoc'h ar pezh a jommo a zilerc'h. »

Jacob a baouezas da gomz hag a vennigas he vugale peb hini d'he dro.

Goude eur pennad ehan, e lavaras dezho ar c'homzou diveza-ma : « Emaoun e vont, emezha, da gaout va zud koz. Diskennit va c'horv e kavargn Ephron, an Ethean, el leac'h ma zema e repos Abraham ha Sara, Isaac ha Rebeka hag ive va fried Lia. »

Gourvez a reas neuze var he vele hag e tennas he huanad diveza.

Joseph, pa velas he dad maro, a lammas da boket dezha gat kalz daelou hag a roas urz d'ar vedisined d'he valzami gat louzeier a c'huez mad hervez giz an Ejipt.

Ar c'haon a badas dek dervez ha tri-ugent. Pa oue tremenet an amzer-ze, Joseph a lavaras da ofiserien Pharaon :

« Va zad en deuz great d'in toui araok he varo, em bije diskennet he gorv er bez hen doa digoret he unan e bro Kanaan. Plijet ganeoc'h goulenn konje d'in d'he gass betek eno, ha dioc'h-tu goudeze me' zistroio da gaout Pharaon. »

« It, a respountas ar roue ha grit d'ho tad hervez m'ho c'heuz touet. »

Joseph a guiteas an Ejipt, hag assamez gantha ar c'henta ofiserien euz ar palez, ar re vraz euz ar rouantelezh hag he vreudeur. Kalz kirri ha kalz tud var varc'h a iea da heul ar gouarner. Pa errujont e leur Atad, var ribl ar Jourden, e chomjont eno a-za ; ober a rejont kement a ioa hervez ar c'hustum evit an anteramantchou, epad seiz dervez gat forz daëlou hag hirvoudou. Kement a rejont ma oue hanvet al leac'h-se gat ar Gananeaned : Kaon braz an Ejipt.

Kerkent a ma oue diskennet he dad er bez, Joseph a zistroas da balez Pharaon. He vreudeur deuet da jomm e bro Jessen n'oant ket eb enkreiz : Rak n'ho doa ket ankounac'heat ar pezh ho devoa great d'ho breur. Brema, pa z'eo maro Jacob, ho zad, daoust a ne deuio ket Joseph da gemeret ar vaz gatho. Setu perak e kassont kannad d'ho breur gat ar c'homzou-ma : « Araok mervel, hon tad en deuz gourc'hemennet d'eomp lavaret d'eoc'h euz he berz e pede he vap Joseph da bardoni d'he vreudeur. Ha ni ive, servicherien da Zoue Jacob, var ar memez tro gant hon tad, a bed ac'hanoc'h da veza mad evidomp ha d'hor pardoni. » Joseph ne c'hellas ket lenn an tam--skrid-se, eb diroll da ouela. Prestik goudeze, he vreudeur a deuas da zaoulina dirazha. Krena'reant gat aoun razhan. Mez Joseph a lavaras dezho gat dousder : « Bezit eb aoun ; ar pezh a zo tremenet a zo bet great gat Providans an Aotrou Doue, a c'hoar tenna ker brao ha tra ar mad euz an drouk. C'hui hoc'heuz klasket ober drouk d'in ha Doue en deuz va zavet huel evit

savetei eun niver braz a dud. Bezit dinec'h. Me ho mago, c'hui hag ho pugale. »

Ar c'homzou-ze a lakeas ho c'halonou laouen. Joseph a vevas c'hoaz betek an oad a c'huec'h vloaz ha kant. Guelet a reas bugale Ephraïm ha Manasse betek an trede rumm. — Pa edo e vont da ver-vel, e lavaras d'he vreudeur :

« Eun deiz a c'houlaouo, ma teui Doue d'ho kuelel. Ho kass a rei euz ar vro-ma, n'oc'h ennhu nemed divroidi, betek an douar en deus touet rei da Abraham, Isaac ha Jacob. Pa zouno an heur-ze, tout ive d'in dougen va eskern ganec'h hag ho c'hass bete va bro. »

He gorv a jommas da repoz e douar an Ejipt betek an deiz ma zeas Israel e penn an hent d'an douar promettel.



TAOLEN.

	PAJEN.
I. Esaü ha Jacob.	5
II. Jacob tec'het euz ar gear	12
III. Joseph guerzet gat he vreudeur	23
IV. Ar galeouner eat da vinistr	30
V. Bugale Jacob en Ejipt	36
VI. Joseph en hem ro da anaout d'he vreudeur.	44
VII. Israel en Ejipt.	53
VIII. Komzou diveza Jacob	57